


imbourenn



N i v e r e n n 53-54

30 Mezheven 1934

I M B F U R C ' H , K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Pempvet bloavezh

Niverenn 53-54

30 Mezheven 1974

Tri zalbenn ar stourm evit ar yezh : talbenn an tiegezhioù.....	p.163
Lizhiri.....	p.175
Hippy, hippy, hippy, hourra ! Hippy, hippy, hippy Krichna ! gant Yec'han-Dominig OLIER.....	P.181
Rakskrid d'ar pennad da heul.....	p.191
Diwar-benn titloù hag anvioù, gant Yann-V. Kervorc'h.....	p.195
Dielloù.....	p.199
Addisplegoù.....	p.203

Koumanant-bloaz : 30 lur. K.R.P. Y. Ollivier. 1 534 25 Eoazhon.
Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 5 lur.

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud,
35 000 Roazhon.

CPPP : 50 015

KEMENN

Embannet e vo hevlene ur rummad niverennoù daouek eus ar gelaouenn evit daou abeg ; da gentañ ez eo bet sammet tre ar re a bled gant IMBOURC'H gant labourioù a bep seurt, dreist-holl ul labour kelenn ha brudañ e par"Skol an Emsav ; d'an eil, e karfemp echuiñ gant ar vent a vremañ 21 x 27 abenn fin ar bloaz. Ne chom mai avat nemet nebeut a-walc'h a c'holoioù eus ar vent-se ha n'hon eus ket c'haont moulañ re nevez evit echuiñ ar bloavezh.

Kentoc'h eget degemer ar vent a-us a zo an norm europat nevez 21 x 29,3:emaomp e soñj, kentoc'h degemer ur vent a-is a vo aesoc'h a glenkañ en ul levraoueg hag a zere gwell, a-hend-all, ouzñ ur gelaouenn a studi.

=====
Renorezh ar gelaouenn
=====

T R I Z A L B E N N A R S T O U R M E V I T
A R Y E Z H : T A L B E N N A N T I E G E Z H I O U

Taolennet hon eus en niverenn diwezhañ eus IMBOURC'H un arnod da ziazezañ ur rouedad kreizennoù brezhonek en-dro da Roazhon. Pal ar c'hreizennoù-se a vefe krouiñ betek ur poent zo ur vuhez foran vrezhonek kreizennet en-dro d'an Emsav ha d'al labour evit ar vro dre vras. Anat eo, padal, ne c'heller ket nemeur empenañ ur seurt buhez foran nemet diazezet e vefe war ur vuhez vrezhonek prevez, da gentañ, da lavarout eo, war un nebeut tiegezhioù brezhonek.

Ret eo anzav avat emañ pell bras diouzh ar pal-se evit ar poent rak un tamm mat a hent a zo etre deskiñ un nebeut brezhoneg hag ober eus ar yezh-mañ yezh an tiegezh o vevañ e kêr pe en ur metou galleg.

En abeg da se e soñj da lod n'eus tu da sevel un tiegezh brezhonek nemet e "Breizh-Izel" (1) e ve, en ur metou "brezhoneger". Dre m'en deus poellataet evel-se en deus dilezet ar skrivagner brezhonek Abeozen, etre an daou vrezel, ar mennad da sevel un tiegezh brezhonek : hervez a zisklerie e unan, ne felle ket dezhañ ober eus e vugale un "doare mouilc'hi gwenn". (2) O prederiañ avat e verzer mat ez eus stignet aze ur falskudenn, ur gudenn, da vihanañ, n'eus diskoulm ebet dezhi.

Betek kreiz ar c'hantved-mañ e oa ur metou brezhoneger war ar maez e Breizh-Izel hag hemañ en dije gallet pour-

(1) An droienn vrezhonek "Breizh-izel" n'eo nemet un droi digezh eus an droienn c'hallek "Basse-Bretagne" anadet er XVI-XVIIvet kantved. (2) Notañ a ranker n'eo deuet bugel ebet eus ar skrivagner d'an Emsav, marteze ivez dre ma voe freuzet an tiegezh-se e-pad ar brezel.

chas ur goudor d'an tiegezhioù brezhonek emsavel a chome war ar maez. Kement-se a oa gwir, dreist-holl e deroù an eil Emsav. Giwriañ a ranker koulskoude ne voe savet tiegezh brezhonek ebet "emskiantek" d'ar c'houlz-se e-touez an Emsaverion, ar re nemeto a c'helle reiñ ur ster da implij ar yezh er gêr (ar vrezhonegerion a-vihanik ne raent gant ar yezh nemet peogwir ne c'hellent ket ober e-giz-all). Hogen na Taldir na skrivagner pe emsaver all ebet eus deroù ar c'hantved ne zeskas ar yezh d'o bugale hag int difennerion ar yezh, a-hervez. Souezhus e hañvalo bezañ an dra-se hogen un diskleriadur bennak a c'heller reiñ d'an diac'hinad-mañ. Goude ma ouient lenn ha skrivañ ar yezh - peogwir e oa anezho skrivagnerion a-wechoù evel Taldir - n'anaveze an emsaverion nemet ur yezh skrivet paour a-walc'h a-benn ar fin ; ne oa neuze metou brezhonek desket ebet. Diouzh un tu all, erfin, e chome stag ouzh ar yezh - bruzhnet e nouspet eilyezh - kramenn ar "bloueziadegezh" ; evit an emsaverion - hag int bourc'hizion etre a-wechoù - e vije bet implij ar yezh er gêr koulz ha diskenn en-dro da rez ur werin a sellent evel mirourez ar yezh hogen a zisprizent war un dro.

Mont a reas an traoù war wellaat tamm ha tamm e-pad an eil Emsav. Adal 1930 e krogjod da sevel tiegezhioù brezhonek e-touez an emsaverion, en ur metou kêrel avat en dro-mañ. Unan eus ar re gentañ e voe hini Yann Sohier, da skouer, diazezer ar Falz (1) ; Kerlann ivez e genseurt, a savas un tiegezh brezhonek all koulz ha J.A.M. ha L.A., nebeut a-raok ar brezel. Tri pe bevar all a c'hellfed menegiñ, hini A.L.A.B., eus Gwaien, hini L., skolaer ivez, evel A.A.B., eus Treger, war lez an Emsav avat, hep kontañ hini pe hini e Gwengamp pe Gemper e-lec'h ne oa avat nemet unan eus ar gerent oc'h ober gant ar yezh. Hini ebet avat

(1) Notañ a reomp pelloc'h e reas tro-wenn an tiegezh brezhonek-se.

eus an "emsaverion"-mañ ne blede gant ar politikerezh -
ma lakaer a-ziforc'h Frañsez Debauvais a savas koulskoude
un tiegezh brezhonek, gant un advab ha na roas frouezh
ebet peogwir ne gemeras hemañ perzh ebet en Emsav (gwall
abred e varvas a-hend-all). Hini ebet eus skrivagnerion
SKOL WALARN - nemet F. Kervella, goude ar brezel diwezhañ -
ne savas un tiegezh brezhonek, kennebeut.

E-touez an tiegezhioù brezhonek a voe savet e metou
an Emsav etre 1930 ha 1944, lakaomp, dibaot hini a reas berzh.
Meur a hini anezho a voe dispennet - pe gant ar marv, evel
hini Yann Schier (e verc'h a voe lonket buan en-dro gant ar
gevredigezh c'hall) pe gant an dibriedadur (pezh a ziskouez
pegen amgevredel, distabil ha distrantell eo meur a "emsaver";
daou zegouezh seurt se a c'hellfen menegiñ er roll am eus
savet uheloc'h). Un tiegezh hepken en deus padet en tu-hont
d'ar rummad war-lerc'h : tri diwar bevar bugel o deus savet
tiegezhioù brezhonek d'o zro e kêr, e metou an Emsav.

oooooooooooooooooooo

War-lerc'h an eil brezel e voe krouet ur rummad
nevez a diegezhioù brezhonek, o chom e kêr an holl anezho,
diwar levezon GWALARN hag AL LIAMM. N'eo ket aet o niver
biskoazh en tu-hont d'un dek bennak. Re abred eo c'hoazh
moarvat evit gellout barn startijenn hag efedusted an eil
rummad tiegezhioù-mañ. Stadañ a c'heller evelkent, dre vras,
da gentañ, ez int bet askorusoc'h eget re ar rummad kentañ,
enno 3, 4, 8 pe 9 bugel a-wechoù, ha stabiloc'h int bet ivez;
n'eus c'hoarvezet torr-dimeziñ ebet en o zouez. Ha d'an eil,
gellet o deus en em vataat ivez eus araezioù sevenadurel zo
ha n'oant ket e kerz ar rummad kentañ a diegezhioù, evel
K.E.A.V. a zo bet, evit darn, ur c'hamp tiegezhioù brezhonek.

"Skol Sant-Erwan", ivez, renet gant Armañs ar C'halvez, en deus harpet tiegezhioù zo da reiñ un deskadurezh vrezhonek elfennel e-pad un nebeut bloavezhioù da vugale un toullad emsaverion vrezhon, war-dro ar bloavezhioù c'hwegont(1). Ret eo kounañ ivez ar gerent o deus klasket skoliata o bugale e brezhoneg er gêr etre 1950 ha 1965, lakaomp ; tri diouto a c'hellfed envel ; e-barzh unan anezho ez eo bet kaset a-zevri ar skoliata-se.

Evit harpañ an tiegezhioù-se, bepred, ez eus bet moulet un dornad levriouigoù brezhonek evit ar vugale, etre 1956 ha 1966 ; e korf un dek vloaz bennak ez eus deuet er-maez ur pemzek bennak a skridoù, pezh na oa ket c'hoarvezet betek neuze en embannerezh brezhonek (en amzer WALARN ne oa ket moulet nemet pevar pe bemp a levriouigoù evit ar vugale). Moarvat e oa troet skrid al levriouigoù-se diwar hini levriouigoù etrevroadel a veze kavet e saozneg koulz hag e galleg ; ar skeudennadurioù a oa amprestet ivez diwar an embannadurioù-se. Hogen pezh a zo da verkañ eo ar preder a lakaed da harpañ an tiegezhioù brezhonek.

A-c'houdevezh e krogas Armañs ar C'halvez da embann, dalc'hmat evit an hevelep tiegezhioù, ur c'hannadig bihan a voe anvet WANIG HA WENIG ma oa ar skrid hag ar skeudennoù meur a wech amprestet diwar embannadurioù kembraek. Skignet e voe WANIG HA WENIG dreist-holl e metou an tiegezhioù brezhonek ; e devoud ne gemere perzh er c'henstrivadegoù da skouer, nemet bugale an tiegezhioù-se.

Ret e vefe ober anv eus EMGLEV AN TIEGEZHIOU a oa mennet da blediñ gant tiegezhioù kristen an Emsav. E devoud n'he deus graet biskoazh nemet prientiñ kejadegoù div wech ar bloaz da vare an nevez-amzer hag an diskar-amzer, en tu-hont d'un emvod bennak da geñver K.E.A.V. an hañv.

Evel meur a stroll brezhon all ez eo bet ivez ur burev embann kemennadennoù evit ar Wask. A-hend-all ez eo bet re zister atav an Emglev-mañ evit gellout harpañ kalz an tiegezhioù da sevel o bugale e brezhoneg nemet dre an engavadegoù hon eus meneget.

Gwelout a reer eta e voe treut a-walc'h frouezh al labour a zo bet renet abaoe 25 bloaz war dachenn ar "gevredigezh vrezhonek" diazezet war an tiegezhioù. Padal e c'heller gwiriañ he deus padet ar gorrgevredigezh-se betek hiziv hag ez eo bet diazezet warni pe ez eo diwanet diouti ar stourm sevenadurel a zo bet kaset da benn e Breizh abaoe 1950. Dre se e c'heller lavarout ez eus bet anezhi un araokadenn e-keñver c'hwitadennoù rik ar c'hentañ hag an eil emsav war an dachenn-se.

Klask a raimp bremañ sevel menteliad an taol-arnod renet etre 1950 ha 1975, lakaomp, evit krouiñ tiegezhioù brezhonek. A-raok dezrannañ ha barn anezhañ e ranker resizañ, da gentañ, n'eo ket ar stourmadenn-mañ da glenkañ e nep doare en emgann hollek a zo bet renet abaoe deroù ar c'hantved evit mirout ar brezhoneg war vaezioù "Breizh-Izel", e-touez ar "werin". Nevez vrezhonegerion a oa eus an emsaverion o deus, a-wechoù, addesket ar yezh diwezhat a-walc'h ; Breizh-Uheliz a oa anezho ivez, meur a wech ; bez e oa anezho ivez, peurlvuiañ, kefredourion o vevañ e kêr, tro pe dro, e Paris pe er-maez eus Breizh, zoken, hep darempred ebet gant ar "vrezhonegerion a-vihanik" nemet dre zegouezh, e-pad an ehanoù pe gant an dud kozh en tiegezh. Dres e c'hellfed komz bremañ eus emzalc'h an dud kozh kozh-se e-keñver o bugale vihan brezhoneger, pe, kentoc'h, nevez vrezhoneger ; o tivizout gant o bugale vihan n'o deus implijet ar yezh nemet keit ha n'o deveze ket ar re-mañ desket galleg, oc'h heuliañ evel-se reolenn ar vrezhonegerion

e Breizh-Izel a ra gant ar yezh kenetrezo nemet gant ar galleg o plediñ gant o bugale.

Peseurt frouezh a zo bet, a-benn ar fin eta, d'an tiegezhioù brezhonek abaoe ar brezel diwezhañ ? Moarvat o deus desket ar vugale lenn ha skrivañ ar yezh un tammig er gêr ; studiet o deus ar yezh un tammig ivez er c'hampoù hag en Devezhioù-studi. Anzav a ranker koulskoude n'eo ket aet o anaoudegezh eus ar yezh klaz en tu-hont d'ar brezhoneg eeun; da lavarout eo, dister eo yezh ar vrezhonegerion eus kêr savet en ur metou galleg hag en ur skol c'hallek evel an holl Vrezhoned vihan ; evel an holl vugale vrezhoneger eus Breizh Izel ivez e ouzont kalz muioc'h a c'halleget a vrezhoneg evito da ~~vrasañ~~ barrek da lenn ha skrivañ ar yezh un tammig bihan. Evel hini bugale ar goueled brezhoneger war ar maez e servij o brezhoneg d'ar vuhez er gêr. Ret eo lavarout a-hend-all o deus dastumet bugale an tiegezhioù brezhonek ar pep pennañ eus o deskadurezh vrezhonek er-maez eus an tiegezh, pe e K.E.A.V. pe en E.S.B. pe S.A.E. h.a., da lavarout eo er gevredigezh vrezhonek hollek a zo o tiwanañ.

Ar gentel a zo da dennañ eo ne c'hell an tiegezhioù brezhonek ober berzh un tammig nemet e framm ur gevredigezh pe ur metou emsavel. Heñveldra : ne savo bugale an nevez-vrezhonegerion un tiegezh brezhonek nemet e diabarzh an hevelep korrgevredigezh emsavel. Se a zo lavarout ez eo aner a-grenn striv ar "vrezhonegerion" a savfe un tiegezh brezhonek o unan penn hep darempred ebet gant an Emsav (an dra-se a c'hoarvez a-wechoù). Padal eo ret degemer n'eo ket metou an Emsav e-giz m'emañ bremañ, enk ha dister meurbet, evit bastañ da ezhommoù kevredadel an holl emsaverion. Evit ar poent ez eo bevennet an "Emsav"

ur metou "bourc'hiz-bihan", pell diouzh ar galloud hag an atebegzhioù pennañ en ur gevredigezh arnevez ; hiraezhif a ra d'e wriziannoù gwerinel hakement-se a vir outañ a stourm a-zevri evit kemer ar galloud (dre se ivez ez eo dic'houest da gas da benn un dispac'h bennak e Breizh hogen se a zo ur gudenn all). Setu, a-benn ar fin ne zimez er metou-se nemet an "emsaverion" "bourc'hiz-bihan"; bugale an emsaverion o tont eus ar vourc'hiziezh etre pe pe a-gozh ne zimezont^{/ket} e par an "emsav" ; lonket int en-dro gant ar metou bourc'hiz etre gall. A hiniannoù eta e c'heller lavarout n'eus ket a eneberezh etre renkadoù e framm an Emsav ; hogen anadiñ a ra an eneberezh-se adarre e par an tiegezhioù ; betek hiziv eta e c'heller gwiriañ ne vez nepred enframmet en Emsav bugale an emsaverion a denn o orin eus ar vourc'hiziezh etre. Ar reolenn-se a c'heller gwiriañ abaoe amzer Gervarker.

oooooooooooooooo

Bezot pe vezot, un toullad tiegezhioù brezhonek a zo bet savet evelkent a douez ar rummad yaouank abaoe ar bloavezhioù '70. Darn eus ar re-mañ, dres, a zo bet diazezet gant bugale o tont eus tiegezhioù nevez vrezhonegerion, nebeut a-walc'h evit ar poent avat. An holl anezho - nemet unan pe zaou - a zo bet krouet e framm an Emsav pe al led-emsav, peurvuañ avat e diabarzh stolloù brezhonek amparet dreist-holl gant ar re yaouank, da lavarout eo E.S.B., S.A.E., kevrenn vrezhonek an U.D.B., un daouzek pe ur pemzek bennak a diegezhioù . Un tammig kresk a zo deuet eta e niver an tiegezhioù brezhonek emsavel e kêr ha meur a wech ez eus bet anv gant an tiegezhioù-se a sevel ur gendrev - da lavarout eo, ur gumuniezh - e kêr pe war ar maez. Ar ratozh-se avat a zo chomet un hufivre betek henn.

E diabarzh ar frammoù pe an aozadurioù o deus roet tro da grouiñ an tiegezhioù n'eus bet rakwelet reizhiad ebet evit harpañ an tiegezhioù nevez-vrezhonek ; pep tiegezh eta a van digenvezet a-grenn nemet ar re a zo kenstag etre etrezo dre liammoù ar gerentiezh. N'eus ket pellzo, moarvat, ez eo bet arnodet bodañ an tiegezhioù yaouank en ur gevredigezh a zo bet anvet "Brezhoneg er gêr" e-lec'h e kej izili eus U.D.B., S.A.E., K.A.B., diwar hengoun "AL LIAMM" dreist-holl. Fellout a rae d'ar gevredigezh yaouank chom neptu war dachenn ar relijion (E.A.T. a embanne e oa katolik). War a seblant avat e tal an tiegezhioù nevez ouzh kudennoù ha diaesterioù disheñvel diouzh ar re o deus skoilhet ar rummad kent hag a zo stag ouzh emroadur ar mennozhioù hag ar vuhezgezh abaoe dek pe bemzek vloaz bennak. Itik eo ar rummad yaouank da dezennoù al luskadoù nagennelour dispac'helour arnevez a-zivout peurfrankizadur mab-den hag ar vaouez peurgent. Kont a vez ganto eus gwir ar vaouez da chom hep bezañ sammet gant bugale na trevell an tiegezh dre vras hag eus gwir ar vugale da zibab o hent o unan ; seurt mennozhioù a zo diouzh ar c'hiz hiziv. Evit gellout embreger o frankiz - hag ivez evit uhelaat rez-bevañ ar c'houblad en ur sevenadur beveziñ a zo deuet mat d'an holl daoust d'ar pezh a arguzont a-hend-all - ez eo krog ar gwragez da labourat war ur vicher bennak. An heuliad eus kement-se, da gentañ, eo ne vez ket ganet kalz bugale en tiegezhioù nevez : tri pe bevar d'ar muiañ ; d'an eil, diaesoc'h eget kent eo sevel ar vugale e brezhoneg er gêr. O vezañ ma labour ar wreg er-maez eus ar gêr e ranker kas ar bugel d'ur "c'hraou" pe un diwallerez pe un devezhourez a zo gallegerez pe n'eo ket e chal da gomz brezhoneg n'eus

forzh penaos ; abred tre ivez e kaser ar bugel d'ar skol vabiged, a-raok m'en dije bet amzer da zeskiñ brezhoneg. Setu, ma kompren ar vugale ar yezh n'int ket evit he c'homz kenetrezo pa vez breudeur ha c'hoarezed er gêr ; yezh ar c'havell evito, a-benn ar fin, a zo ar galleg. Start eo eta krediñ en defe ur seurt hanter arnod ur ster hag un dalvoudegezh bennak.

E-barzh metou E.S.B., a-hend-all, e nac'her reiñ ur pouez arbennik bennak d'an tiegezhioù brezhonek a zo renket e-touez anadennoù dispredet an eil emsav, stag ouzh marevezh ar "Geto". Burutellañ a reer an "tiegezh" , evel m'hon eus merket, en anv gwirioù ar merc'hed ha gwirioù ar vugale. Ret eo gwelout en eneberezh-se ouzh an tiegezh - se hon eus merket - tres al levezon o deus bet war lod e eus an emsaverion al luskadoù nagennelour a zo diwanet abaoe 1968 hag en em ziskouez, peurgent, el luskad enep-bredvezegelour a laka kiriek d'ar bredkleñvedoù pep beliezh diazezêr ha dreist-holl hini an tiegezh (kv. ar film saoz : FAMILY LIFE).

K'avout a ra deomp ned eo ar c'hudennoù stignet gant an enep-bredvezegelourion nemet falskudennoù ha ne glask an emsaverion a ra dave dezho evit dinac'hañ an tiegezh nemet un tu da dec'hout a zirak atebegzhioù ur veli re bounner evito (penaos e c'hellfent bezañ gouest war-c'hoazh da ren ur Stad neuze ?) Anat eo moarvat ez eo an tiegezh arallekaus en ur stumm. Hogen, da gentañ, pep stroll a zo arallekaus ha ret mat eo, koulskoude, d'an dud bevañ a-gevret ; a-hend-all e c'hellfed lavarout ez eo an tiegezh arallekausoc'h c'hoazh evit ar gerent eget evit ar vugale, adal ma kemer ar gerent o c'hefridi a-zevri. Ouzhpennañ a c'hellfed a-hend-all e rank an arallekadurioù

bezañ kempennet hag assammet diouzh ma ne c'hellont ket bezañ dilamet (touell ar varksouriezh eo bet reiñ da grediñ e c'hellent bezañ dibradet kuit).

E gwirionez n'emañ ket ar gudenn aze ha moarvat darn eus skrivagnerion ar gelaouenn EMSAV o deus merzet mat an dra-se ivez. Anat eo ne servij da netrasevel un tiegezh brezhonek maz eo hemañ digenvezet a-grenn diouzh an Emsav brezhonek e unan; biken ne vo 'feal' ar vugale d'ar yezh ha d'ar vrogarouriezh vrezhon en abeg d'o zud hepken. Kement-se, a-hend-all a zo gwir war n'eus forzh peseurt tachenn : steuziet eo ar brezhoneg war ar maez peogwir ne oa anezhañ nemet ur yezh tiegezhel ha ne oa stag ouzh kevredigezh politikel ebet. Ma ne gej ket ar vugale vrezhoneger gant an Emsav ne virint ket eta ar yezh.

An dra-se a zo gwir. Hogen krediñ e c'heller sevel e vugale evel Gallaoued - o komz galleg outo, peurgent - ha faltaziañ e vo tu, daoust da se, d'o lakaat da gejañ gant an Emsav a-c'houdevezh, a zo fazi hag emdouell, a-grenn. Re anat e vo d'ar vugale an dislavar a vo e buhez emsaver ar gerent evit ma c'hellint, goude-se, reiñ ur ster bennak d'an Emsav.

oooooooooooooooooooo

Moarvat n'eo ket aes saviad an tiegezhioù brezhonek ; ne zeunt ket mat a-benn da zeskiñ mat ar yezh d'o bugale ; diaesaat a reont buhez ar re-se o c'houlenn diganto komz er gêr ur yezh ha n'anavezont ket mat. Skoilhet eo a-hend-all an darempredoù etre bugale ha kerent en abeg da skorsted ar yezh a vez implijet er gêr. An diaezamantoù-se avat a rank bezañ degemeret : lod int eus ar brezel a renomp e Breizh evit saveteiñ, da gentañ, hor broadelezh. Emañ an disamm anezho e stourm hollek an Emsav evit rediañ ar galloud a zalc'h

mererezh an deskadurezh en hor bro da vrezhonekaat ar c'hel-
ennerezh tamm ha tamm. Rak sevel skolioù evit an emsaverion
hepken n'eo ket un diskoulm ; ne rafe nemet gwashaat ar Geto
emsavel, lakaet e ve gallus an diskoulm-se. An deskadurezh hollek
eo a zle bezañ kemmet diouzh ezhommoù ar bobl vrezhon.

oooooooooooooooo

Er pennad a zeu eta ez ensellimp ar stourm evit brezhonekaat
ar reizhiad kelenn e Breizh.

Y.O.

=====

NOTENN. - Darn a vo souezhet dre ma ne ran ket anv eus an
tiegezhioù brezhonek 'devoudel' e Breizh-Izel. Ne gav ket din
ez eus anezho ken. Ar gerent a gomz brezhoneg ouzh o bugale
hiziv a ra a youl gaer ha bez ez eus anezho emsaverion eta.
Ne vefe nemet tud dizesk a-grenn a gomzfe c'hoazh hiziv
brezhoneg ouzh o bugale er gêr war ar maez.

Dacust d'ar pezh a soñj hiniennoù, pouezus meurbet eo
arnod an tiegezhioù brezhonek emsavel e kêr o vezañ ma n'en
deus mui ar brezhoneg chañs ebet da zreistvevañ en ur metou
plouezat hengounel ; n'eus nemet sellout ouzh ar c'hartennoù
nevez embannet e-barzh ar "Bretagne économique" hag adembannet
war "Ouest-France" n'eus ket pell evit merzout e kendalc'h an
diboblerezh d'ober e reuz war vaezioù Breizh-Izel. En amzer-
da-zont ne vo ket en tu-hont da 30% eus ar boblañs e Breizh
o vevañ war ar maez ; ar re a chomo zoken a vo bet kêrelaet o
stuzegezh gant an araezioù darempredoù hollek ("mass media").

=====

L I Z H I R I

Amañ da heul ez embannomp ul lizher kaset
deomp gant trour pennad J. Fourastié.

Ya, ho trugarekaat a ran bezañ embannet ar
pennad-se gant Fourastie; azaouez bras 'm eus outañ;
n'eo ket avat abalamour d'e gredennoù relijiel, evit
e wirionded nelavaran ket; ouzhpenn se bez' ez eus
ennañ ur spered diazezet hag ur ouiziegezh disi war
an traoù a bled ganto. Un dellid eo deoc'h padal bout
embannet ar pennad-se; aon bras 'm eus e ve rebechet
ouzhoc'h bezañ warlerc'hiet, mirourel, dehouat ha me
oar... Ne 'm eus ket kavet ho pe kemmet em zroidigezh
traoù hag a zalc'hen dezhe; miret hoc'h eus zoken
traoù evel "emunel", n'am boarveret nemet dre na 'm
boa ket graet anaoudegezh gant "piaouel" hag a zo
gwelloc'h; pe c'hoazh, evel "derc'hentouriezh" evit
ar galleg "passéisme" ho pije gallet lakat un dra
bennak dereatoc'h; sonjet 'm eus a-c'houde e vije
bet gwell "diagentouriezh"?

Lennet ' eus gant aked, penn da benn,
niverennoù Imbourc'h hoc'h eus bet ar vadelezh da gas
din. Na 'm eus ket kavet enno pezh a c'hortozen: ur
reizhad mennozioù, ur gelennadurezh politikel, un
divezouriezh, ur c'hantreizadur d'an ober emsavel;
hogen kavet 'm eus pennadoù e-leizh ma'z eus enno

un adsked eus pezh a gredan.

Ha ret mat eo din ivez anzav bremañ pa 'maon krog em 70 bloavezh n'on ket mui ken itik war ar c'hantreizhiadoù prederel. Deut on da grediñ e oa renet an den kalz muioc'h gant an trivliadoù eget gant ar poell; ha mar talvez ar poell da ziskleriañ, betek ur poent, ne dalvez ket kalz da donkañ d'an den e oberoù. Bountet ha stlejet omp holl gant karantezioù, c'hoantouù, kasonioù ha poanioù ha neket gant rat ha gant poell.

Koulskoude ma ho teor e lavarinn deoc'h pezh a sonjañ diwar IMBOURC'H hag ar mennad a c'houlit seveniñ.

Diazezet eo ho tezo war ur mennad: adsevel ur gevredigezh e Breizh ha kantreizhet eo ar mennad-se hepken war ar garantez ouzh ar vro. Sed a zo da enebañ: da gentañ n'eo mui ken ar garantez-vro un anoug da gemmañ ur gevredigezh, ha nebeutoc'h c'hoazh da grouiñ unan all. Distremenet eo. D'an eil ne gav ket din e ve tu da grouiñ ur gevredigezh; un anadenn devoudel eo; kaout a ra din avat e c'haller krouiñ un divezouriezh diazezet war un urzhaz arall a'n talvoudoù. Ha se eo a rank bezañ kinniget gant ur gelennadurezh o tiskouez finvezioù da vuhez an den. Bez' e c'heller ivez kinnig un urzhiadur eus an darempredoù kevredigezhel, hag un urzhiadur politikel; hag e ranker neuze merkañ ur pal d'ar politidurezh, ur gefridi d'ar gevredigezh.

Un amkan zo gant IMBOURC'H: krouiñ ur gevredigezh vreizhat. Perak krouiñ ar gevredigezh-se ? Ha perak breizhat ? Ha war betra he diazezañ ? Daoust hag e kav deoc'h ez eus gant ar geizhour un dellid

brasoc'h eget gant Fourastié, lakomp, hag e tlefe dre se ober al lezenn d'egile? Daoust hag e kav deoc'h en deus ar c'henderc'hour gwirioù war e genderc'hadoù hag e rank ar bevezour, ar vaouez, ar bugel, an ar-zour,, plegañ d'e youl ? Daoust ha ne gavfe ket deoc'h e ve d'ar bevezour ezgeriañ e ezhommoù ha goulenn groñs e vent gwalc'het ? Goude holl hep bevezour n'eus ket ezhomm a genderc'hour. Daoust hag e kav deoc'h e rank ar gevredigezh plediñ gant pep ezhomm eus pep den ha lodenniñ, dazparzhañ dibaouez ar c'henderc'hadoùkoulz hag urzhiañ ar c'henderc'hañ ? Daoust hag e kav deoc'h e rank ar gevredigezh startaat ar veli etre daouarn an arbennigourion, en o rendad, hep gwareziñ an astud ouzh ar veli dirollet ? An holl c'houlennoù-se, a ze asan en dizurzh, hag ur bern divent a reoù all zo da vout atebet gant ur gelennadurezh.

N'on ket deut a-benn da sevel ur reizhiad, ha ne gav ket din e ve gant den ar ratoz diskiant da sevel unan klok; hogen kinnigoù darnel a c'hall bout laket war an daol gant ma vezont kantreizhet gant un toullad pennaennoù digendael degemeret da ziazez.

Evidon-me (ur gredenn eo) bez'eus gant an den ur steuñv bevoniell da erounit. Bez' ez eus gant ar gevredigezh ur gefridi: barnekaat pep den da erounit ar steuñv. Pep tra a zever diouzh an diw bennaen-se. Rak bez' emañ ar preder, ar poell, an trivliadoù, ar strivadoù korf, ar strivadoù meiz, ar strivadoù

askre dibaouez o seveniñ ar steuñv. Ha ne c'hall bout sevenet nemet e kreiz ar gevredigezh, gant asant ar gevredigezh, hervez mennadoù ar gevredigezh.

Petra eo ar steuñv bevoniell ?

Penaos e vez sevenet, pa vez ?

Penaos e wered ar meiz, an trivliadoù, an ezhommoù ?

Penaos ez int da vezañ urzhiet ?

Penaos e kinnigo ar gevredigezh an araeziou d'o gwalc'hañ? Ha pere?

Evidon-me, pezh a gredan eo ne c'hall ket an den bevañ hep poan, hep doan, hep plijadur en ur c'hortoz bemdez e ve pasket gant ur gevredigezh holl-evezhiant, e ve dasparzhet dezhañ bemdez e lodenn eus ar c'henderc'hadoù ha merket dezhañ bemdez e lodenn labour. Ne gredan ket er genurzh. Krediñ a ran ez eo ganedigezh un den un dizurzh er gevredigezh ma rank homañ diwall outi . ma rank hemañ, en difenn. Evel a welit n'on ket tamm ebet ouzh ar c'hiz, ne gredan ket tamm ebet e ve pep gwir gant ar veli na gant ar gevredigezh. Bez' emañ ivez ar gwir gant an den hag e zizurzh hag eno emañ ivez ar gwir da zispac'hañ, gwir an emsevel.

Ma'z eus ur gwir d'an Emsav, e gwir an den eo emañ diazezet.

Marteze awalc'h avat emañ pell ouzh prediri an dud a-vremañ: ne welan ket mat perak ez eo diazezet ar stourmoù politikel war arbennoù armerzhel dres en ampoent ma 'z eo bet kaset da get ar baourentez; n'eus den paour ebet ken, pa lavaran paour, evel ma oa bremañ zo 60 vloaz. Ne welan mui ken ar paour kaczh o stouñ e benn war doull an nor en ur zibunañ pedennoù ken e ve roet, dezhañ un tamm bara. Naon 'm eus bet gwezhall pa oan nemet un trotig bihan, gwelet 'm eus va mamm o redek ar feurmoù da glask labour kemenerez ha dont er ger da noz gant un tamm bara' mann evidon; ha gant se pa welan an talabao a zo gant an dud evit kaout ur sizhun vakañsoù ouzhpenn pe deizoù harz-labour gopret e teu din ur mousc'hoarzh.

Moarvat n'eus ket tu da zedennañ evezh an dud nemet gant daeloù eus ar seurd; n'eus ket tu da gomz eus rezid, eus tonkadur, eus dleadoù; jahinet eo an dud gant an son da zioueriñ pezh o deus ha pezh n'o deus ket, hag a c'hallfentkaout, mar bije er bed ur reizh-wir. N'on ket evit mont gant an hent-se. Lavaret vo marteze ez eo brav din komz, pa ne ziouerañ tra, pa na'm eus ezhommnetra. Hag a zo gwir: n'am eus ezhomm netra nemet mont en-dro da'm bro ha ne c'hallan ket. Ne c'hallan ket ha setu.

War a welan emañ "Emsav" o treiñ war du an ober politikel, bremañ. Daoust hag o deus savet ur gelennadurezh bennak, 'benn ar fin? Na dic'hoanagus eo bet evidon gwelout tud ken barrek all o torc'hweniañ e lagenn ar gevredadouriezh varksat o vont gant ster an "istor". Ar fazi brasañ zo bet graet gant ar brederourion a-vremañ eo: krediñ e oa un devouderezh save-ladus e steudad an degouezhioù istorel; ne vez savelet morse nemet un niver a zevouderioù hag an hollved eo a zo devouder war bep darvoud; ha penaos savelañ kement a zo er bed e pep koulz eus an amzer? Gant na vije nemet evit se ez eo kondaonet ar gelennadurezh danvezourel.

Mat; arabat din ho sibardiñ pelloc'h; pa'm bo un dra bennak a vije tu da ginnig da Imbourc'h e kasin anezhañ deoc'h. Ha bennozh c'hoazh evit an hini hoc'h eus embannet.

Kenavo.

pezh a zo. Paper a zebr neuze ar vuoc'h. O sell ta!
ur sac'h gwer amañ, ha n'eo gwer? liv ar geot.
Kregiñ a ra da zebriñ ar sac'h. Met buan, buan, setu ar
perc'henn o tont e fulor. Ne dalv ket ar boan bezañ ul
loen sakr evit pakañ kementa daoliou.

An hippied a c'hoarzh. Pa ouzont c'hoazh
c'hoarzhiri. Ne gomprenont ket gwall dra en holl zoueed
a zo aze. Ne welont nemet ar golo. Ar "brahman" e-
barzh ar stêr a gemer dour e palvoù e zaouarn hag e lez
anezhañ da redek etre e vizied o lavarout pedennoù.

Gouzout, pe chom hep gouzout. Kompren, pe chom
hep kompren. Evit an hippied, an talvoudusañ a zo bevañ
en un doare disheñvel. O frankiz zoken a zo chadennoù
nevez. H. Hag ar strinkell o tegas an huñvre anave-
zet. O c'harantez evit ar bed zoken a zeu da vezañ un
emgarantez nevez. Bro Indez, bro ar furnez. Ha pelloc'h
c'hoazh, Katmandou : Mekka an hippied.

Bro ar furnez, pe bro ar reuzeudigezh, bro an
naon? Klask ar peoc'h evidomp paze eus brezel war
hon tro. Ar c'hodell leun a zollarioù. Pegement ar
furnez? Met klask a reont memestra, zoken^{ma} ne gavont
ket atav, zoken ~~na~~ faziant. Dizoloet o deus
n'eo ket a-walc'h an arc'hant.

Ha te, beleg! Lavarout a rez pedennoù evit ar
re all, evit ar re zizesk na ouzont ket. Reifi a reont
dit un nebeut arc'hant evit ober da labour relijiel. Ha
te, beleg! abaoe pell amzer e rez al labour-mañ :
"abaoe atav, va zad a oa beleg, ha va zad-kozh, hag
e dad, hag e dad..." "Ha da vab, beleg! kenderc'hel a
raio da lavarout pedennoù ? - O nann, ne gendalc'ho ket.
- Perak ? - Pegwir ne vez ket gounezet a-walc'h a
arc'hant.

Brahman! e-barzh da di kaer, diouzh giz Europa, dizoloet ac'h eus ur furnez nevez : gant al lisiv X, sari da gwreg a zo gwennoc'h eget sari gwreg da amezeg, Koka-kola a evez. Koka-kola, evaj sakr ar gevaleou-riezh.

Yaouankiz bro an arc'hant o klask ar furnez, tud bro ar furnez o klask arc'hant, an holl o klask hag o kejjout etrezo hep en em welout. Pebez meskaj!

E pelec'h emañ ar wirionez ? E maged H an hippy a bed dirak delwenn Krichna pe Bouda pe e-barzh gaz chimik ar "koka-kola" oc'h ober boulhioù e-barzh kof ar brahman nevez pinvidikaet ?

Menezioù an Himalaya. Tren obet e bro Nepal. Nemet ur c'harr-boutin en deus poan, en deus kement a boan o pignat ^{gant} an oabl. Treuzet eo ar c'houmoul. Goude bezañ chomet un deiz o santout hor reor torret war ar bankoù koad, sur, e vo kavet ar baradoz.

Met gouzout a rit, baradoz an douar n'eus ket anezhañ. Katmandou. Leun a douristed, leun a girri : prenit eñvorennoù, prenit, prenit. Katmandou, kêr touristel. Un hent-dall eo ?

Baleomp evelkent er straedoù kozh: an temploù, an tiez e prenn skultet. Unan eus ar c'hêrioù bravañ a weler dre ar bed. Met ar vravantez n'eo ket a-walc'h. Bale un devezh, mat; daou devezh, mat; tri devezh, t Ola! kregiñ a ran da anavezout ar gêriadenn-mañ, rak n'eo ket bras Katmandou. Ha n'eo ket ar stalioù a ginnig H "e gwerz frank" a lakay an enoe da dec'hout kuit.

Katmandou! Kêr ar furnez pe gêr an arc'hant?

An hippied, ur mousc'hoarzh war o muzelloù a fell dezho krediñ ez eus c'hoazh un hent da ergerzhout. Met peseurt hent? Da c'hortoz, adkemeret eo ar c'harr-

boutin spontus betek an harzoù, hag antren e Raksaul.

An tren. An dud 'vel loened berniet, berniet. Tu ebet da astenn an divhar. 6 eur, 12 eur, daou pe tri devezh evel-se. An deiz, an noz. Spontus.

An H a zo opium ar bobl.

Met ar c'houer n'aoar netra, ne ra goulenn ebet. An eürusted, ar frankiz. Petra eo se ?

Debriñ a ra un tamm "chapati". Chapati, ur galetezen graet gant bleud maiz kemmesket gant dour ha poazet war an tan. Soubañ a ra anezhañ e-barzh an "dal": dourenn temzet kreñv. Setu holl. Re baour eo evit debriñ traoù all. Gounit a ra 2 pe 3 rroupi bemdez. 1 rroupi:75 kantim. Dek, pevarzek bugel da vagañ. Hag ivez ar vibien-gaer, ar merc'hed-kaer hag o bugale, ar gendirvi hag ar c'heniterved hag o bugale, an nized hag an nizezed hag o bugale...

Paouezit a ober bugale, paouezit. Met ne gomprenont ket. Atav ez eus bet graet 10-14 bugel. Kenderc'hel a reont. Petra ober neuze, troc'hañ...?

An tiegezh re niverus en ti. Un ti graet e koad. Ar mogerioù gant bambouz plezhet. Lakaet ez eus warno ar dilh graet gant dour, kaoc'h saout ha pri kemmesket. Brav ha naet eo. Teir sal : unan evit an tiegezh, unan evit al loened, diforzh ebet etrezo. Un trede sal evit ar boued. Serret eo ar sal-mañ. Petra 'zo serret er vro-mañ. Pa vez an dud re baour e teuont da vezañ laeron. Piv a c'hell tamall dezho? Da c'hortoz, diwallit d'ho tollarioù.

Da vintin, al loened er-maez. Hag an dud ivez. Ar vugale a gas saout ha givri ar gêriadenn er parkeier.

An dud a grog gant o devezh dre en em walc'hiñ war-dro pemp eur. Ur gouronkadenn a gemeront bemdez. Kousket a

reont holl gwisket, gwalc'hiñ a reont neuze o gwiskamantoù ivez bep mintin. Padout a ra an emwalc'hiñ un eur, pe muioc'h. Ha trouzus eo evel just. Pep bro tomm a zo bro an trouz. Rakañ a reont o c'horzailhenn evel ur c'harr pa ne c'heller ket lakaat ar c'heflusket da vont war-raok.

Pavez echu, pa vezont naet, neuze e pedont. Goude evit kregiñ ^{gant} an deiz labour en un doare mat, evel Gaston Lagaffe, mont a reont da ziskuizhañ. Ken mat eo en em dommañ dirak an heol. Straedoù ar geriadenn 'zo 'vel porzh un atant. Pep hini a zo mignon d'egile.

Da 9 eur e tebront. N'eo ket lein, - merenn ne lavaran ket. Da bemp eur e vo koan. Labourer e vez hep ehan etre 9 eur ha 5 eur. Hep ehan, hep ehan, arabat komz re vuan. Tomm e teu an amzer da vezañ, dreistholl war-dro kreisteiz. N'eus "metro" ebet e Bro Indez evit redek; al labourerien a zo re baour evit prenañ un eurier. Hag an heol a lavar dezho: "Kemerit hoc'h amzer, amzer hoch eus evit bevañ, amzer hoch eus evit mervel, ha n'eus forzh penaos : Hare Krichna."

Glav ebet. Ret eo klask an dour ken pell e kof an douar! Ur puñs: 25 metrad e donder, 4 metrad e treuzlinenn. Ha c'hoazh, tu 'zo da ziskenn e-barzh hep glebiañ an treid. Ur c'houer a ziskennen traon. Ret eo dezhañ leuniañ ar sac'h-ler. Daou ejen a sach neuze ar gorden a dro ouzh ar pole. Kaset eo an dour etre ar parkeier. Hag evel-se a-hed an deiz, a-hed an deiz. An daou ejen a dro hag a zistro hag ar c'houer, e foñs er puñs, a gan. O ya, tud : glav 'zo acour.

Met evel e Kemper hag e Montroulez, re a zour a c'hell bezañ fall. Ur pont : 25 metrad uhelder. Ar

stêr koulskoude n' he deus ket muioc'h eget 4 metrad don-
der. Ar mousson. Opala! mui pont ebet. Diframmet ar
piferoù en o diazez. Ar c'hêriadenoù distrujet gant
feulster, ar ster e fulor.

Pa ne vez ket glav, ar marv eo. Pa vez re
a c'hlav, ar marv eo. Diaes eo ar vuhez, ar glav hag
an heol a ro ar vuhez un deiz, ar marv un deiz all.

Met ret eo adsevel. Ar vuhez a gendalc'h atav.
Ha dont a raio un deiz: ar frankiz.

Bengal, frankiz, ruz.

Ruz a zo liv ar frankiz e broioù an naon.

A! bro Indez, a lavar Malraux, n'out ket evel broioù
all, (bro Sina da skouer) deut da vezañ un diktatouriezh.
Chomet 'out dieub.

Diktatouriezh zo, evel-just, gant Mao, an doue ruz
(gant Krichna, an doue glas, ne vank mui nemet Napoleon
an doue gwenn evit ober glas-gwenn-ruz: liv ar stad
doueel). Met e Bro Indez ez eus an diktatour gwashañ
a c'hell bezañ er bed: diktatour an naon. Lazhet e vez ar
spered, ha se a choarvez peogwir n'o deus mui an dud
nerzh a-walc'h, ha peogwir, ivez, n'o deus ket ar vugale
"prot.ïn" a-walc'h evit rafevefe diorreet o empenn. E
Bro Sina, da nebutañ, pep hini en deus da zebriñ. Met
Malraux ne gompren ket an dra-se. Ur **bourc'hiz eo.**
"Malraux ruz d'ar vourc'hizion!"

Bengal, ruz. E rannvro Bengal, e-kichen Bangla
Desh, ez eus tud a stourm. Ar strollad Komunour Indezat
a zo mignon da Rusia. Moskov a lavar e ranker kaout ur
werin evit ober an dispac'h. Met an'eus gwerin ebet en Indez;
ar c'hlañvalc'helezh a zo o ren. Evit kaout ur werin e ranker
kaout ur vourc'hizelezh. Setu penaos eo deut ar strollad
komunour da stourm evit sevel ar gvalaouriezh e bro
Indez en ur skoazellañ ar vourc'hizien. Levr sakr an doue

Marks a zo levr sakr an doue Marx. Goude un disivoud e voe savet un eil strollad : ar strollad komunour indezat. Met kement-se ne gemm ket gwall dra daoust m' en deus trec'het ar Strollad-se en dilennadegoù e stad Kerala e 1957. Neuze ez eus bet kaset da benn un eil disivoud (moarvat, an trede a vo an hini mat) gant ar vaourion : ar S.K.I. ; anavezet eo diouzhtu gant an Tad-kozh Meoñ (digarezit : Mao). Paotred ar Strollad-mañ(1) a lazhañ an holl dud : ar vourc'hizion, an archerion, ar berc'henned, hogen ivez, stourmerion an daou strollad komunour all, arstudierion ha me oar-me piv c'hoazh... Ar re all en em veñj. Ha setu an holl oc'h en em lazhañ kentrez, en anv an dispac'h eveljust tra ma lazhañ ha ma laka en toull lu ha kerreizh ar vamm-gozh Indira (ken karet, gant pivavat?) kement hini a hañval bezañ ruz pe roz.

A-benn ar fin e vo trec'het an "dispac'herion" en abeg d'o strizhkredennouriezh spontus ha d'o feulster heugus, met ivez en abeg da fazi politikel an impalaer Mao e-pad brezel ar "Bangla-Desh". Skoazellet en deus ar Pakistan. Perak harpañ ar Pakistan, ur stad kilstourmerez, maz eus unan war an douar ? Petra ' fell deoc'h ; ret e oa plegañ d'an "abeg-a-stad" !Marteze en doa lavaret Karl, ar Profed, e oa ret skoazellañ ar Pakistan kentoc'h eget ar Bangla-Desh ?Pelec'h avat en e skridoù ? Me n'em eus lennet an dra-se e neb lec'h. Arabat eo deoc'h ober goulennoù avat, tudoù : Mao, a zo ken barrek an tamm anezhañ, e-giz ma ouzoc'h, a zo gouest da lenn "etre al linennoù", moarvat ! Pe, ken tost ha maz eo ouzh an neñvoù ruz (rak e Sina, na petra, ne c'hell ket an oabl bezañ glas)

(1) Naksalited areer anezho.

en deus aterset spered Charlez Barvek : Spered Marks, daoust hag emaut aze ? Sko teir gwech : Bim Ba Laoñ ! Bim evit ar Vourc'hizion, Ba evit ar Bangla-Desh, ha Laoñ evit ar re n'int ket a-du gant an doue Marks o komz dre va genoù ! Nag a daolioù !

Goude ar mell fazi-se eus Mao ez eo deuet an dud da vezañ enep-maoat a-grenn en Indez. Evit ar mare, da vihanañ.

Evurusamant, jentil eo Indeziz ; saveteet o deus ar Bangla-Desh. Ya, o lu a zo aet da sikour ar paour kaezh pobl merzheriet-se. "Brav eo Bangla-Desh, goude holl," o deus soñjet a-c'houdevezh. "Perak ned afemp ket da dremen hor vakañsoù eno ? Ha perak, a-benn ar fin, ne chomfemp ket atav enni ?"

Setu huñvre impalaeriezh Indez : adunaniñ en ur Stad Indez, Pakistan ha Bangla-Desh, na petra ! Kement-se evit kregiñ. Hogen goude ? Perak ne vete ket lonket Nepal, Sikkim, Boutan. Ha Sina, hum ? Nann, n'eus ket tu ! Arabat kaout daoulagad brasoc'h eget ar c'hof, 'keta!

Jentil eo Indeziz ? Evel kement pobl he deus galloud : impalaourion int. Pep galloud a fell dezhañ bezañ mestr war ar bed. A-enep da gement Galloud zo e rank ar bobl stourm.

"Ha Gandhi," a c'houlennit. - "Petra eo se?" - "N'eo ket un dra, un den, ne lavaran ket." - "A, ya, gwir eo, gwelet em eus an delwenn anezhañ e pep kroazhent. hag ar skeudenn anezhañ e pep ti. Piv eo avat ha peseurt mennoziou en doa ?" - "Ar peoc'h a felle dezhañ ; Bro Indez a zo Bro c'hGandhi." - "Bro c'hGandhi ? Gwelout a ran avat al lu e pep lec'h, archerion gant fuzuilhoù, tud ken paour ma ne c'hellint biken prederiañ." - "N'ec'h eus

ket gwelet tud o vevañ gant mennozioù Gandhi ?" - "Gwelet em eus tud oc'h ober an aluzen."

Petra a chom eus mennozioù an den-meur-mañ ? Nebeut a dra, siwazh. N'eus forzh penaos, n'eo ket Gandhi un doue ; un den eo ha gellout a ra faziañ evel an holl, da skouer, pa lavar ez eo ret da bep hini chom en e renk: jentil eo ar vourc'hizion ; plediñ a raint a-zevri gant gwirioù hag hoal-vat al labourerion. Meur a vennoz mat a zo dezhañ ha ret mat eo o studiañ hogen dav eo ivez e lezel en e blas. Un den ez eo ha n'eo ket un doue.

Tra ma skrivan va fennad ez eo kroget ar glav da gouezhañ. Glav ' zo aour, 'm eus lavaret. Youpi! Me ' zo pinvidik !

Yec'han -Dominig OLIER
Roazhon lañ a viz Mae '74

G.S.

Abaoe m'em eus savet va fennad ez eus tarzhet ur vombezenn atomel en Indez. An dra-se a ziskouez deomp n'eus netra da c'hortoz digant ar galloud ruz pe wenn. Pa vo Breizh"dieub", daoust hag ur vombezenn vreizhat a vo ganeomp ivez ? Diwallit, tudoù ! Pep galloud a zo marv ar bobl. Ur galloud breizhat a vo marv pobl Vreizh. Ne stourmomp ket evit adkregiñ gant fazioù ar mac'homer pe vezañ gwashoc'h egetañ. Stourm a reomp evit bezañ ur bobl dieub hag evurus e-touez an holl bobloù dieub hag evurus. Ur vent hollvedel, un dalvoudegezh hollvedel en deus hor stourm pe ne vefe ket anezhañ.

=====

RAKSKRID D'ar pennad da heul

Embann a reomp amañ da heul ur pennadig war un destenn un tammig displedek ha digevadeg, hini an titloù noblañs e Breizh. Dibouez a-walc'h ha dic'hizet a-grenn eo hevelep testenn e gwirionez. Padal ez eo goustennet gant kudenn ar renkadoù hag ar c'hendereoù e Breizh ha n'eo ket bet studiet a-zevri betek henn, a gav deomp. Damveneg a reomp anezhi er pennad a ouestlomp a-hend-all da emled an tiegezhioù nevez-vrezhonek en Emsav abaoe deroù ar c'hantved, ha merket hon eus e ser ar gudenn-se ez eo amparet an Emsav er mare-mañ gant izili eus ar metou bourc'hiz-bihan kefredour dreist-holl, tost a-walc'h d'ar werin hogen dispartiet diouti koulskoude. Tu-mat ar metou-se ez eo bezañ distrob diouzh ar bed politikel gall stadel ; evit ar poent avat ez eo stank ivez techoù fall ha sioù politikel ar metou-se, ar re washañ o vezañ al lentegezh hag an hiniennelouriezh a vir ouzh an izili anezhañ a sammañ atebeg-zhioù politikel gwirion hag o laka da glask repu en "huñvre" rannvroelour - hep gouzout dezho zoken - hag en utopegezh, o spiañ - hep henn anzav a-wechoù - e vo diskoulmet ar c'hudennoù er-maez eus Breizh ; dre an hent-se avat emaint war var da vezañ atoret gant n'eus forzh peseurt emsav araogelour - pe sañset - a ray berzh e Bro-C'hall.

En naontekvet kantved hag e deroù an ugentvet e oa amparet an Emsav gant noblañsoù ha bourc'hizion hengounel ; perzhioù-mat zo o devoa ar re-se : skiant ar genurzh, lakaomp, ha gouest e oant a-hend-all da sammañ atebegzhioù politikel. Enframmet e oant avat er bed politikel gall ha dre se e oa tonket dezho bezañ atoret gant ar reizhiad vourc'hiz armerzhel c'hall, ar vourc'hiziezh kevalaour er ster strizh. An dra-se hon eus merket e-barzh "ISTOR AN EMSAV" o tiskouez penaos n'eus bet tiegezh breizhat hengounel ebet o kenderc'hel da stourm evit ar vro e-pad meur a rummad. Hiziv an deiz e c'hellfed gwiriañ an hevelep reolemm, e ser degouezh ar stourmer breizhat P. Keraod, da skouer, a reas war-dro skauted Vleimor goude ar brezel diwezhañ, oc'h embann ar gelaouenn

vroadelour hengounel SKED hag a zo bet desachet a-benn ar fin d'al luskad gall henvoazelour "SKAOUTED EUROPA" (un toulladig brogarourion vrezhon a zo da gaout el luskad-se e Breizh hogen n'eus mar ebet ez eo awenet an aozadur-mañ, dre vras, gant ur gealiadurezh c'hall hengounel dreist-holl).

Forzh penaos n'emañ ket ar gudenn aze. Evit pezh a sell ouzh hon dezo er pennad-mañ ez eo a-walc'h lavarout ez eo ar yourc'hiziezh hengounel - oc'h enklozañ ar re emanvet 'noblañsoù' - gallekaet a-grenn hag enframmet er reizhiad politikel c'hall. War ar poent-se e karfen, dres, dedennañ an evezh. Arabat eo krediñ ez afe ar stourm etrerenkadel e Bro-C'hall betek distrujidigezh ar metou hengounel. Bepred o deus renerion ar Stad c'hall hag int Republikaned sokialour - gouez dezho - diskouezet ar brasañ doujañs evit izili ar renkadoù hengounel ; enframmet o deus ar re-mañ en o reizhiad bepred petra bennak ma oa ar reizhiad-se enebet krenn ouzh dalc'hadurioù ha kendrec'hadurioù ar metou hengounelour-se (notomp ivez penaos izili ar c'hendere henvoazelour a harpe hag a greñvae ivez ar reizhiad e oant mennet sañset da zistrujañ, war-bouez kenlabourat ganti, dres). Ar pleustrezh-se a c'heller gwiriañ e par ar Stad hec'h unan. Hogen en diaz zoken e kendalc'h ar mererezh gall - hag eñ renet gant kleizourion meur a wech, en "Deskadurezh Vroadel", lakaomp - da zamantiñ ouzh izili ar metou bourc'hiz hengounel. Skouerioù resis a c'hellfen reiñ eus an damant-se hogen ne gav ket din e talv kalz ar boan.

Peseurt heuliad politikel a zo e Breizh da enframmadur ar metou hengounel er reizhiad politikel c'hall, nemet hemañ : E Breizh ne c'hello an Emsav biken atoriñ ar metou hengounel a zo gallekaet don. Dre se e vo tonket dezhañ, ma ra berzh, diazezañ ur renad gwerinel araokaet a nevez a-grenn ar gevredigezh e Breizh, a vo awenet gant ar gevarzhelezh hag harpet war an emvererezh, un emvererezh reolet gant an emsaverion o unan.

Daoust avat hag ur seurt renad a c'hello dioueriñ a-grenn pep urzhaz ha pep begennelouriezh ? D'hor soñj n'eo ket sur ha gwell eo d'an emsaverion chom hep en em douellâ war ar poent-se.

Skouer ar riezoù sokialour - adal Rusia betek Yougo-Slavia - (ho pezet soñj eus tamalloù Djilas graet abe a-bellzo dija a-enep d'ar renkad-ren nevez en e vro) - a ziskouez e tiwan abred a-walc'h er reizhiadoù emanvet sokialour ur renkad-ren nevez a zalc'h, na petra, d' e c'halloud ha d'e vrientoù. O vezañ pezh ez eo natur mab-den hag empledadoù arc'hwelat ar c'hevredigezhioù denel ne weler ket mat penaos e c'hellfed tec'hout a-grenn diouzh hevelep skoilh (1).

Anzavomp, a-hend-all, ez eus un diforc'h bras etre ar renkadoù-ren nevez-se hag ar re ez eur boaz da sellout outo evel renkadoù-ren er broioù kornogat a Europa. Ar c'hendereoù hengounel n'int mui, er broioù-se, e darempred gant ar bobl, abaoe pell n'int mui na degemeret ganti ha, dre se, n'o deus levezon ebet mui warni; an doujañs a ziskouez kaout ar renkad-ren gwirion kevadeg e Bro-C'hall evit ar c'hendereoù hengounel a zever diouzh ur rakvarn hag ur vrizh-kredenn souezhus hogen n'he deus mui ster nag heuliad politikel ebet. En eneb ez eo stuziet ha stummet ar werin er reter hag er broioù sokialour, dre vras, gant ar renkad-ren nevez a seven neuze e gefridi penn-da-benn.

E gwirionez koulskout, e kav deomp ez eo diaes bras hepkoriñ an urzhaz a zo stag ouzh pep framm, adal ar mare ma anzaver ne c'hell kevredigezh ebet peurbadout hep framm. Gwell e ve tremen hepto moarvat, hogen, adarre, n'eo ket keveskemmus an dud ha ret mat eo a-hend-all d'ar c'hargoù a ya d'ober ur gevredigezh bezañ kefleuniet; an holl avat n'int ket gouest na c'hoantek da sammañ atebegzhioù zo a c'hell bezañ pounner ha dañjerus a-wechoù. Nac'hañ ar gwirionezioù elfennel-se a zever hepken diouzh ur goustiañs fall klañvidik ha pilpouz a-walc'h war ar marc'had. Ar pezh a ranker diwall dezhañ hepken ez eo diogeliñ digorded, heloc'hted ha 'treuzusted' ar gevredigezh, ur pal a

(1) E Sina, war a seblant, n'eo ket disheñvel tre an traoù. En "dispac'hoù sevenadurel" a c'hoarvez eno ent vareadek eo ret merzout anadur ur c'hevezerezh etre renkadoù-ren pe urzhazoù kenstur a zisoc'h da zistrujadur unan anezho. Ne gav ket deomp ez eo vertuzusoc'h ar reizhiad sinaat eget ar re all, - pilpousoc'h, ne lavaran ket.

a c'heller tizhout war-bouez digreizennañ ar galloud hag an atebegzhioù en diaz.

Padal eo arabat krediñ evit keloù-se n'o devo an tiegezhioù roll ebet da c'hoari en Emsav zoken e Breizh rak dre an tiegezhioù e vez miret ha treuzkaset ivez ur c'hevala pe ur gefridi speredel evel ar yezh pe ar vrogarouriezh, nemet diazezet evefe ur gevredigezh e-giz hini Sparta en henamzer war ur gen-gladegezh rik a zo diaes da empennañ hag a vefe distaolet moarvat gant ar boblañs. Seurt reizhiad, a-hend-all, a zisoc'hfe da reiñ ur roll pouezusoc'h c'hoazh d'an ensavadurioù a zeufe da vezañ, moarvat, gwaskusoc'h hag arallekausoc'h eget kent. Se zo lavarout avat ez eus atav brientoù zo gant hiniennoù dre berzh ma aparchantont d'un tilu pe d'ur stroll bennak (iliz pe strollad adal ma c'hoari ar re-mañ ur pennroll en ur gevredigezh bennak). An dalc'h eo mirout na glotfe gant al levezon pe ar brient speredel ur galloud armerzhel pe bolitikel dreistgoñvor a vefe tonket dezhañ breinañ ar re a dennfe o mad dioutañ end-eeun.

Y.O.

=====

NOTENN.

Lavaret hon eus e oa disrannet krenn ar metou bourc'hiz hengounel diouzh ar "werin". Se hon eus merket meur a wech. Betek un nebeut bloavezhioù², moarvat, e chome e darempred ganti dre hanterouriezh un Iliz hag a oa manet hengounelour hec'h unan. Abaoe ur pennad amzer zo avat, dek pe bemzek vloaz bennak, eus c'hoarvezet un doare emrann e diabarzh an Iliz katolik ; diouzh un tu e krak-vev un izel-Iliz a garfe chom a-stok ouzh ar werin, damantus eta d'ar varksouriezh ha d'ar c'helennadurezhioù "araogelour" ; diouzh un tu all e klask un "uhel-Iliz" diazezañ un doare geto evit ar gristenion a fell dezho bezañ feal d'ar feiz 'hengounel' ; o vezañ maz eo pep feiz hengounel dre natur ne c'heller ket nemeur tamall an dra-se dezho ; hogen gwiriañ a ranker war un dro e reont eus ar feiz-se un doare kealiadurezh a servij ivez da zifenn lazoù kendereoù zo, un doare benveg-stourm ; da nebeutañ, setu an dañjer a c'hourdrouz ar gristenion-se hep gouzout da zarn anezho. Evit ar poent, e devoud, ne gaver er geto-se nemet bourc'hizion hengounel disrannet diouzh ar pep brasañ eus ar boblañs. Keit ha ma chomo ar gevredigezh evel m'emañ ne vo ket tu da sklaeraat na da zigemmeskañ rendaelioù zo, keit ha ma chomo diempret evel m'emañ, da vihanañ.

DIWAR - BENN TITLOU HAG ANVIOU
GANT Yann - V. KERVORC'H

Biskoazh n'eus bet gwelet o tiwanañ er Republik c'hall - hag e Breizh - kement a gonted, a varkized, a varoned, a veskonted, daoust ma ned eer ket en hor bro betek an "Dug" hag ar "Priñs", evel ma reer e Paris.

Kement-se a lakafe a-walc'h unan da vousc'hoarzhin pa ouzer n'eus ket ouzhpenn eizh-kant bennak a dud titlet er "Rouantelezh-Unanet" a zo ur riez brientinel a-gefridi. Eus pelec'h eta e teu e Bro-C'hall an albac'henn-se a zo par d' un albac'henn all m'eo sod ganti ar C'hallaoued o unan, - hini ar medalennoù. Sebezet on bet o pourmen war ar straed e Paris o verzout n'ouzon pegement a dud, kozh pe goshoc'h, ma oa kinklet toull-nozeleñ o forpant gant ur merk-enor bennak. A-benn ar fin e taole unan evezh ouzh ar re n'oant ket medalennet ! A ! Ma teufe Bismarck en-dro war an douar !...

Ha c'hoazh : da vihanañ ez eo gwirion ha diles an darn-vuiañ eus ar medalennoù-se gwarantet gant al lezenn. Hogen n'eus forzh piv a c'hell kemer un titl hep doujañ kosp ebet a-berzh al lezenn. Setu : a-benn ar fin n'eus ket o vezañ diles ouzhpenn unan dre gant eus an titloù a noblañs a zo douget gant tud zo.

Daoust ha dleout a zleer sellout ouzh an dud-se evel ouzh falserion ? Dre vras avat n'eo ket dav ; a feiz vat eo kalz anezho ha droug a yafe enno ma tiskouezfed kaout douetañs war zilested o zitl.

Peurvuiñ ez eus anv eus lignezoù tudjentil wirion, dezho un titl bennak hogen na c'hell bezañ douget nemet gant an hini henañ; henañ a vez roet evelkent da bep hini eus ar vibion en ur stagañ outañ a-raok ur c'hentanv; seurt titl a zo douget gant unan e-pad e vuhez hogen ne vez ket treuzglozet gantañ d'e ziskennidi.

Klaskomp diskleriañ kement-se.

Empennomp un tilu "Kerargant", lakaomp. An hini henañ eus an tiegezh-se a biao diwar hêrezh an titl a "Gont". Bez e vo anezhañ eta "ar C'hont Kerargant" (ne vez ket meneget ar c'hentanv). Maz eo anvet e vab henañ "Herve" e vo graet eus hemañ - keit ha ma vo bev an tad - "ar C'hont Herve Kerargant", gant ar c'hentanv dre ret.

Pa vo marvet e dad digantañ e teuo ar mab da vezañ "ar C'hont Kerargant" (hep kentanv ebet).

M'en deus ar c'hont Kerargant mibion arall - Yann, Even, Pol - ez eur kustum da reiñ dezho, dre gourtezi hag e-pad o buhez, an titloù a "Kont Yann Kerargant, Kont Even Kerargant, Kont Pol Kerargant", bepred gant ar c'hentanv dre ret hogen o diskennidi n'o devo titl ebet nemet e teufe ar yaouer d'e zegemer ma c'hoarvezfe gant ar skourr henañ mont da hesk.

Evit pezh a zo eus an titloù "deveret" - kont eus markiz, beskont eus kont, lakaomp - ez int faltaziek a-grenn ha n'o deus, e gwirionez, diazez ebet, nemet boazamant tiluoù rouaned zo.

Maz eo kresket kemendall niver an titloù e-barzh tiluoù zo ez eo kiriek dase feiz vat hag emdouell ar yaouerion o deus kendalc'het da zougen a dad da vab "titloù a gourtezi" a oa personel ha buhez-pad nemetken pe na oant nemet titloù "deveret" a seurt gant ar re hon eus meneget a-gent. Resizañ a ranker evelkent ez eo douget an titloù-se gant tiegezhioù a noblañs wirion pe a vourc'hiziezh kozh hogen ivez, alies, e Paris, - dibaotoc'h a wech e Breizh e-lec'h en em anavez an holl - gant nevez-pinvidion ha n'o deus mez e ebet o tereiñ dezho o unan hevelep enoradurioù.

Evidon-me ne welan abeg mat ebet da vezañ ken garv all ouzh an "titloù a-berzh ar Pab" ha n'int ket muioc'h estren en hor bro eget an titloù dezevet da Vrezhoned zo gant rouaned Vro-C'hall, war-bouez un nebeut sac'hadoù gwenneion, dreist-holl er seitekvet hag en triwec'hvet kantved. N'eus forzh penaos ne zlee ket an titloù-se mont en tu-hont da vuhez an hini en

devoa prenet anezho, ha diwar wall-voaz ez int deuet da vezañ herezhel. An titloù a-berzh ar Pab avat o deus gopret a-wechoù servijoù rentet d'ar Babelozh e gwirionez, ur vrokusted wirion, a-wechoù ar gwad skuilhet.

Evidomp ne zlefe kaout un dalvoudegezh wirion nemet an titloù dezezvet gant an devezeion vrezhon, re an tiluoù glad-dalc'hel pennañ (1), ar re n'eus ket bet graet noblañsoù anezho peogwir e oant noblañsoù a-viskoazh.

§§§§§§

Evit pezh a sell ouzh implij ar rannig 'de' e galleg n'he deus netra da welout gant an noblañs. An hanter, da vihanañ, eus an tiegezhioù a zoug anvioù a zo dezho ar rannig 'de' a zo tiegezhioù a vourc'hiziezh kozh hogen taeek (2) rik. (n'eo ket dav komz amañ eus an dud o deus ezhomm hiraat o anv ; deverrus e vefe klask titour a-zivout ar re-se war ar ganrolloù).

Maz it da Ganada avat (pe ma ne c'hellit, kemerit ar bloazlevr-pellgomz Krec'h-ar-Roue) e tegouezhit gant un niver bras da sabatuiñ a diegezhioù a bep dere (eus ar werin avat an darn-vuiañ anezho) a zo dezho ar rannig 'de' en o anv, en un doare reizh ha diles meurbet.

Didalvez eo komz eus ar broioù latin (Spagn, Italia, Portugal) e-lec'h ez eo ar "rannig" stank meurbet, hep ster kevredigezhel arbennik ebet avat.

A-getep avat ez eus tiegezhioù a noblañs wirion ha n'o deus rannig ebet en o anv.

Ouzhpennañ a rin n'eus tu ebet da dreiñ ar rannig "de" e brezhoneg ; ha n'eo ket ar yezhadurour Kervella am dislavaro. An "de"-se, na petra, a ziskouez hepken al lec'h orin e galleg ha da dreiñ e vefe eta gant "Kêr...". Troidigezh c'hallek reizh "an aotroù Kerlann" a vefe "Monsieur de la Lande" hag an dimezell Kerbrad a vefe da dreiñ "Mademoiselle du Pré". Anvioù avat evel "de Kerbrad" pe "de Kermanac'h" n'o deus eta ster resis ebet.

(1) Gant ma vijent manet feal da Vreizh ha d'ar mennad broadel a-hed ar c'hantvedoù (Notenn ar skridaozerezh). (2) "Rôtu'rier".

"Monsieur de Kerargant" a rankfe eta bezañ troet gant "Aotrou Kerargant" ha na vefe ket da gemmeskañ gant an "An Aotrou Kerargant" ma ne venner ket derc'hel kont eus keal al lec'orin (1).

Evit klozañ : e Breizh e vez douget an anvioù "rannigek" gant tiluoù kozh, taeek a-grenn avat, peurvuañ. Tiluoù kozh, a-hend-all, n'eo ket ur c'herienn resis ; diskouez a ra hepken tiluoù gouvriaded dezho un tamm brud hag un tamm peadra abaoe ur pennad amzer ; rak, evit ar peurrest, e tiskennomp holl eus Adam, 'keta ! A-hend-all e vefe an tiluoù koshañ e Breizh ar re a zoug an anvioù brezhon koshañ, o tarzhañ eus amzer an hen vrezhoneg, e grez diazevidigezh ar vroed gant ar Vrezhoneg o tont eus Enez-Vreizh ; an anvioù-se avat a zo douget aliesik gant tud paour eus ar bobl, hag a zo, koulskoude, kaer ha degounus, koulz hag anvioù brientinion : an Helgoualc'h ("brokus e zorn"), Kadoret ("a zoug skoazell en emgann"), Morvezen ("Kadour ar mor") h.a. Ret eo anzav o devoa hor gourdadoù skiant ar varzhoniezh hag ar gened - seurt na gaver ket nemeur en hor sevenadur-beveziñ - pa veze anv a zibab un anv bennak (rak an dud gwechall a zibabe o anv). An darn-vuañ eus ar re a zoug an anvioù-se ne ouzont ket peseurt ster o deus : un azon ouzhpenn eus arall-ekadur hor pobl. Mat e vefe eta d'ur gouiziezh bennak a seurt gant an ao. Fleuriet ober imboure'hadennoù war hon anvioù-tiegezh hag embann frouezh e labour evit brasañ mad hor pobl.

Yann-V. Kêrvorc'h

=====

(1) Stag e oa an noblañselezh, er penn-kentañ ouzh ur galloud-barn ha melestrañ hêrezhel var un diriegezh bennak, evel hini ur maer un tammig. Pellzo eta n'he deus mui an noblañselezh ster ebet ; distrujet eo bet gant ar rouaned o deus diazezet ar Stadoù arnevez europat o tiskar ar c'hladdalc'helezh. (Notenn ar skridaozerezh).

D I E L L O U

Rakkemenn

Da geñver Dael diwezhan S.A.E. e oa bet kinniget daou rumm mennadoù-diazez ha steuñv-labour gant pep a zanvvez poellgorerounit. A-raok ober un nebeut addisplegoù dezho ha da zisoc'hoù ar vouezhiadeg e roomp amañ da heul ar skrid anezho.

=====

Rumm kentañ

MENNADOU-DIAZEZ SKOL AN EMSAV EVIT AR BLOAVEZH-SKOL 1974-1975

Goude bezañ aet war-raok e-pad tri bloaz bennak ez eo degouezhet S.A.E. en un enkadenn a zo war var da gas anezhi da get.

Graet he deus berzh SKOL AN EMSAV betek henn dre ma oa e Breizh, d'ar mare ma voe krouet, un ezhomm mallus, eus ur reizhiad kelemm kentañ derez dre gomz. Hiziv n'eo ket ken mallus an ezhomm-se.

Diouzh un tu all he deus dilezet SKOL AN EMSAV, e-kerzh ar bloavezhioù-se, ar mennañ politikel a oa bet hec'h hini hag a oa krouiñ ur gevredigezh vrezhon. Dre se n'he deus ket gallet dedennañ ha mirout an danvez stourmerion vrezhon o dije gallet frammañ anezhi.

Da se e oa kiriek, ret e oa lavarout, an diouer a gelennadurezh hag a stummadur e-touez an izili.

Erfin, o vezañ ma oa enket SKOL AN EMSAV e metou ar studierion n'he deus ket gallet skoulmañ darempred da vat gant ar bobl.

+++++

Evit derec'hel kont eus saviad nevez ar yezh e Breizh, a vez kelet mui-ouzh-mui er skolioù gall, ha parrat ouzh an nammoù hon eus meneget e vefe dav, d'hor soñj, tizhout ar mennadoù-mañ :

En diabarzh e tlefe eta izili SKOL AN EMSAV

- gouestlañ o strivoù da gelenn ha da stummañ danvez izili nevez mennet da labourat en aozadur ha da gas da benn e amkanioù: kement-se a c'houlaka e ve resisaet palioù politikel D.A.E. enklozet en diazezoù (1);

- mirout obererezh an holl izili d'an aozadur hepken. Da lavarout eo, ne c'hell an izili anezhi kemer perzh e labour aozadur politikel ebet, ne vern pehini e vefe.

(1) Merkañ a raimp diouzhtu emañ atebion ar mennadoù-mañ a-du gant digreizennadur ar galloud, ar gevreadelezh rik hag an emvererezh klok ken er par armerzhel ken er par politikel. Mennet eo S.A.E. da harpañ stourmoù ar serin e Breizh e par ar stourm broadel hollek a ran ren hor pobl evit en em zicubiñ hag en em ziarallekaat a-grenn war dachenn an ar merzh, ar politikerezh hag ar sevenadur. An uhelpal broadel a c'hell hepken mirout na ve atoret stourmoù ar werin e Breizh gant strolladoù estren impalaerelour evel ma c'hoarvezet gwechall e Rusia.

En diavaez e ranko S.A.E. adal deroù ar bloavezhèskol 1974-1975 kas da benn ar steuñv-labour-mañ :

- krouiñ e kement kreizenn zo ur rummad kentelioù eil derez o devo da bal reiñ da anaout d'an danvez izili istor Breizh, istor an Emsav e Breizh, istor ar broioù keltiek hag o emsavioù koulz hag hini an holl emsavioù dieubiñ en Europa hag er bed diouzh ma vo tu ; e ser arstudi-mañ e teuy an izili da vezañ doazh ouzh kelennadurezh an Emsav a zo gwriziennet e kevala GWALARN ha SADED;

- aozañ devezhioù-studi a vo mennet da zoonat anaoudegezhioù emsavel an danvez izili hag o frientiñ d'an arnodenn a rankint tremen evit bezañ degemeret da vat da izili S.A.E. (2) ;

-evit pezh a sell ouzh al labour foran e kinnig an danvez poellgor-erounit e ve renet un enklask pervezh diwar-benn stad ar yezh hag ar brezhonegva ; an enklask-se a zlefe bezañ diaz diazezet war ar yezh implijet gant ar vugale en o c'hoarioù e porzh ar skol. Ar respontoù d'an enklask-se a c'hellfe bezañ pourchaset gant amered, skolaerion ha personed goulennataet e pep parrez.

Da heul an enklask-se e vo savet gant S.A.E. ul levr gwenn diwar-benn stad ar yezh ; war zisoc'hoù an enklask-se e vo diazezet ur stourmadenn he devo da bal lakaat pobl Vreizh hag ar pennadurezhioù politikel atebek eus an deskadurezh kefridiel e Breizh er mare-mañ da emouezañ ouzh o c'hiriegezh ; dre an enklask-se e c'hellfe pobl Vreizh hec'h unan kemer skiant eus an enklaskenn he deus da dalañ outi ha da drec'hiñ ma fell dezhi tec'hout diouzh an arallekadur hag an distrujidigezh sevenadurel. Pal ar stourmadenn-se a zlefe bezañ brezhonkaat emberr ar skolioù babiged hag ar skolioù elfennel e Breizh, ha da gentañ er brezhonegva.

Hemañ o vezañ pennañ amkan S.A.E. e par an obererezh diavaez ez eo klevet e kendalc'hfe S.A.E. da stourm a-hend-all evit astenn mui-ouzh-mui lec'h ar brezhoneg war holl bazennoù an deskadurezh e Breizh a-bezh ha da grouiñ ar framm kelenn broadel hag ar gevredigezh vrezhon a zo bet, adal an deroù, he falioù kentañ.

(2) Disammet e vo an izili addiazezerion diouzh ur seurt arnodenn.

+==++=====+

Eil rumm kinnigoù

RAKLAVAR

N'eus ket tu da zielfennañ saviad Breizh en ur ober dave d'ar modoù-produiñ nemetken. Daoust maz eo ret dieubiñ an den evel benveg-produiñ ,arabat e vefe sellout outañ nemet diouzh ur savboent armerzhel. Evel maz eo bet klasket gant ar Stad c'hall nac'hañ ar fed broadel breizhat p'en em ledetar c'horvodur kevalaour, - ar Stad o prientiñ ar Vretoned da general lec'h dibabet evito er genreizhiad armerzhel, -e vez kavet bremañ e meur a stourm"armerzhel" elfennoù

broadel, - kresk ar stourmoù sevenadurel ha kresk ar stourmoù armerzhel o vont a-gevret, o kreñvaat an eil egile. E soñj S.A.E. n'eo ket reizh gortoz ar sokialouriezh evit stourm ouzh gwask-erezhioù nannarmerzhel hag o deus darempredoù gant stourm ar renkadoù hep bezañ stag ouzh ar mod-produiñ-mañ-mod-produiñ en un doare eeun.

Setu perak e stourm S.A.E. evit ha dre ar brezhoneg, elfenn gentañ ar vroad vreizhat. Ar brezhoneg a zo yezh vroadel Vreizh o vezañ ma vez graet dave d'ar brezhoneg zoken en darn eus Breizh e-lec'h ma n'eo mui komzet abaoe pellzo. N'eo ket evit se e welomp ar brezhoneg evel yezh ofisiel nemeti ur Vreizh dazont hag a zo gwall goumoulek.

Ar brezhoneg n'eo ket evidomp yezh diouganerion pe ur strollad intellekt-hualet troc'het eus pep gwirvoud ; ur benveg-dieubiñ eo evit ur vroad wasket, gant ma vo implijet e darempred e-pad ha gant stourmoù fetis hor pobl evit he dieubidigezh hollek.

=====

KINNIGOÙ PLEUSTREK EVIT AR BLOAZ A ZEÜ A. E-keñver an ezeladur

Digor eo S.A.E. da gement hini a ra eus ar brezhoneg e yezh hag a zo prest da gemer perzh e labour an aozadur a zo bet resisaet en DAEL a-raok ;

- goulennet e vo digant pep ezel ur skodenn vloaz a servijo da goumanant d'ar gelaouenn;

- an ezel, ur wech leuniet ur follenn-enrollañ ha paet e skodenn :

en deus ur vouezh en Dael ;

a c'hell bezañ anvet er poellgor-rem ;

a c'hell bezañ anvet er poellgor-seveniñ.

B. Labour an izili hag ar c'hreizennoù

Un ezel a zle:

- klokaat e zeskadurezh vrezhonek ;

-deskiñ mat e rannyezh ;

- tapout ur pouez-mouezh brezhonek ;

- deskiñ an diforc'hoù brasañ etre ar rannyezhoù.

Kemer perzh e labour ur greizenn a rank ober un ezel. Ma n'eus kreizenn ebet e-lec'h m'emañ eo dav dezhañ klask sevel unan.

Labour ur greizenn a zo :

- reiñ kentelioù brezhoneg ;

skignañ brezhoneg (gwerzh levrioù, harpañ ar c'helaouennoù brezhonek, dir b-holl "Evit ar brezhoneg") ;

- bodañ ar skolidi da grouiñ ganto ur vuhez vrezhoneger (c'hoariva, nozvezhioù, diskouezadegoù h.a.) ;

-kemer perzh e brezhoneg (pa vez tu) e stourmoù sevenadurel ha kevredigezhel hor pobl ;

- kenlabourat gant kelennerion all (Al leur nevez, ar Falz h.a.)

K. AN EMBANN

1) graet e vo ur c'hannadig e galleg hag e brezhoneg eeun da vezañ skignet etre ar skolidi dedennet gantañ ma vo paet ur skodennig ganto.

Ernañ e vo keloù dreist-holl eus :

- SAE ha labour ar c'hreizennoù ;
- ar stourmoù e Breizh.

Ar pennadoù a zo da vezañ savet gant ar skolidi ar muiañ posupl.

2) Embannadurioù da vezañ gwerzhet en diavaez ha moulet brav (offset) :

- ul levrig bruderezh "Petra eo S.A.E." ?
- kentelioù uhel ha prezegennoù ;
- labour skolidi ar rummad uhel ;
- niverennoù preder (e-giz an niverenn 6)

D. An AOZADURIOU KREIZ

1) An Dael :

- bodet e vez ur wech ar bloaz ;
- pep ezel a c'hell kemer perzh en o labour ;
- termeniñ a ra ar politikerezh hag ar roll-labour evit ar bloaz ;
- dilemm a ra ar poellgor-seveniñ evit kas da benn an obererezh.

2) Ar poellgor-ren :

- dileuridi ar c'hreizennoù hag izili ar poellgor-seveniñ a ya d'henn ober ;
- bodet e vez teir gwech ar bloaz ;
- e labour a zo dreist-holl :
 - a. diluziañ kudennoù a savfe ;
 - b. prientiñ an Dael ;
 - kenurzhiañ an Devezhiou-studi.

3) Ar poellgor-seveniñ :

- dilennet eo gant an Dael ;
- pemp ezel a ya d'henn ober, tri anezho o chom e Breizh-Izel ;
- nikun hag en defe ur giriegezh en ur strollad politikel ne c'hell bezañ ezel eus ar poellgor-seveniñ.
- pep hini eus an izili anezhañ a blede gant labourioù resis :
 - a. darempredoù gan aozadurioù all ;
 - b. prientiñ an emvodoù-diabarzh :
(dael, poellgor-ren, devezhiou-studi)
 - k. kenurzh ar c'hreizennoù ; ar gelaouenn
(karget e vo da zegemer an izili nevez) ;
 - d. ar bruderezh evit an aozadur, an devezhiou-studi, a levrioù-embannet ;
 - e. ar mererezh : lakaat ar c'hreizennoù da reiñ arc'hant.

E. ROLI-LABOUR EVIT AR BLOAVEZH DA ZONT

- Kentelioù brezhoneg e kement lec'h maz eus izili ;
- kentelioù pep live.

Devezhioù-studi :

- Da Nedeleg, kentelioù war ar ramyezhoù evit ar gelennerion hag an danvez-kelemerion.
- Da Bask : evit ar skolidi.
- Vakantsoù bras : a. 15 devezh e miz Gouere.
b. 8 devezh e Gwengolo.
k. War ar maez.

Kendalc'hed e vo an darempredoù gant "Engleo Breiz", "Al Leur Nevez", "Ar Falz" h.a.

- Adc'hraet e vo un deiziataer, Gouel ar Brezhoneg, ma ra berzh.
- Kresket e vo ar c'houch kelaouenniñ evit embann muioz'h.
- Lakaet e vo ar skolidi d'ober war-dro ar c'hannadig ar muiañ postpl.
- Embannet e vo ul levrig bruderezh "Petra eo S.A.E.?" e galleg hag e brezhoneg.
- Kenlabouret e vo evit sevel filmoù e brezhoneg (TORR E BENN).

=====

A D D I S P L E G O U

Un nebeut adisplegoù a zo d'ober d'an daou rumm kinnigoù-mañ. Ret eo notañ, da gentañ, ez eo bet degemeret an eil rumm gant ar muianiver eus an izili a gemere perzh en Dael-se eus S.A.E. Un diskleriadur a c'heller reiñ, gwir eo, d'ar votadeg-mañ ; nevezet eo bet ezeladur S.A.E. hevlene ; eus ar re o devoa diazezet ar strollad pe gemeret perzh en e labour er bloavezhioù kentañ ne chom mui nemet un nebcudig. Se a c'hoarvez, gwir eo, e kalz aozadurioù all met kement-se a ziskleir ivez perak ez eo bet kemmet spered S.A.E. a-benn ar fin ; e gwirionez, an izili nevez n'int ket bet stummet e-barzh S.A.E., en ur metou pe ur strollad all, ne levaran ket. Daoust ma oa bet aczet reolennoù strizh evit degemer da izili an enstriverion n'int ket bet lakaet nepred da dalvezout hag e gwirionez n'eus ket bet biskoazh, betek henn, a ezeladur furmel. Betek henn, kennebeut, n'eus bet na levrierion na renerion e-barzh S.A.E.

Amkan ar rumm kinnigoù kentañ a oa, dres, parrat ouzh an diouer a stummerezh hag a levrierezh a vire ouzh S.A.E. a zont da vezañ un aozadur gwirion ; un arnod a oa anezho ivez da zistreiñ da vroadelouriezh orin an aozadur ;

blese al lec'h a oa roet enno d'ar studi. E gwirionez e venne aozerion ar c'hinnigadurioù-mañ addiazezañ ar Strollad. A-walc'h e vije bet an amkan-mañ dezho ha moarvat ez eo bet merzet evel un dislavar lodenn bleustrek ar steuñv a oa taolennet gant an danvez poellgor-erounit ; un aozadur war adurzhiañ ne c'hell ket kas da benn ur stourmadenn foran ken pouezus hag an hini a oa rakwelet er roll-labour a oa kinniget.

Pleustrekoc'h e oa, en eneb, ar c'hinnigadurioù graet gant an eil rumm evito da vezañ re garget, d'hor meno. Rak-se, emichañs, evelkent, ez eo bet dedennet ganto an izili a oa deuet da emvod Gwengamp. Hogen n'eo ket ar raktres labour e unan a fell deomp ensellout ha burutellañ en dro-mañ, - kentoc'h an awenadur hag an diazezoù anezhañ. Er c'heñver-se avat e c'heller lavarout hep chañs ebet da faziañ e laka anat ar roll-labour-mañ kreñvadur an tuadur kleiz-at pe zamgleizat an aozadur. Ma implijomp an anv-gwan "damgleizat" avatez eo peogwir e chom amsteriek a-walc'h an diazezoù nevez evelato ; an amsteriegezh-se, a hend-all, a oa bet diskuliet gant P.S. e deroù ar bloaz-mañ p'en devoa kaset e lizher dilez d'ar Strollad. Da lavarout eo, broadelour ha sokialour ez embann S.A.E. bezañ bepred hag, e devoud, e-pad breutadegoù an Dael ez eo bet diogelet ar vroadelouriezh meur a wech gant darn eus izili ar vodadeg (penaos e c'hellfe bezañ a-hend-all adal ma tifenner ar yezh ha na c'hell kaout ur ster nemet e par ar vroad?)

Ret eo anzav, koulskoude, n'eo ket gwall sklaer keal ar vroad e spered an holl izili (hag eno e par adarre an amsteriegezh) ; da skouer e nac'her dremañ ouzh savidigezh ur stad vrezhon a vefe gouest hepken da ober eus ar brezhoneg ur yezh kefridiel e Breizh (pezh na dalv ket e rafe kemendall n'eus forzh peseurt "stad vrezhon" a vefe savet ; didalvez e vefe, da skouer, gortoz ur politikerezh brezhonekaat a-berzh ur Stad vrezhon diazezet ha renet gant bourc'hizion rannvroelour galleger met aesoc'h e vefe d'ar vroadelourion aloubiñ seurt Stad, evelkent, eget ar Stad c'hall hec'h unan, eveljust). Hogen distroomp da gudenn ar vroad : anat eo n'eus broad ebet hep kumuniezh politikel diforc'h ha dishual ; ur vojenn eo ar gredenn e c'hellfe hanvezout ur vroad e framm ur gumuniezh politikel estren rak, dre dermenadur dres, ez eo ar vroad ur "gevrediezh" politikel distag (a-walc'h hon eus anavezet e Breizh pe e Kembre a vrogarourion c'hall pe saoz o komz pe o skrivañ brezhoneg pe gembraeg evit gouzout ne dalvez ket ar yezh, drezi hec'h unan, kalz tra evit termenñ ar vroad). En un doare iskis a-walc'h avat e tistro S.A.E. da vrizh-kredennoù an Emsav kentañ a asure ivez e c'helle ar "vroad" hanvezout er-maez eus pep bonreizh piauvel.

Moarvat e ranker gwelout en dilez-se eus an uhelvennad stadel un doare faezhiadegezh(hini ebet eus ar re a zo e penn S.A.E. er mare-mañ n'en em sant gouest da stourm e sell da sevel ur Stad vrezhon, moarvat ; er gwellañ degouezh e c'hortozont d'ar re all he sevel). Hogen, evit darn da vihanañ, e tever an dilez-se ivez eus an disfiz a vag kalz re yaouank hiziv ouzh ar Galloud stadel, dre vras (ha gwir eo ivez ez eo anatoc'h eget biskoazh hiziv ar mac'homerezh hag ar gwallarver anezhañ). D'hor soñj, koulskoude, ez eo emzalc'h ar re yaouank dirak ar Galloud hag ar Stad trivliadel en e zonañ ; un doare tec'h a zirak kudennoù diazez ar politikerezh a ranker merzout ennañ.

E-lec'h-all ivez, avat, emañ amsteriegezh broadelouriezh S.A.E. Dave a ra ar steuñv-mañ da bennaennoù awenet gant ar varksouriezh. Merzet en devo unan avat, a-hend-all, e nac'h an diazezoù-mañ diren ar sevenadur d'ar "modoù-kenderc'hañ", elese, d'an armerzh. Da lavarout eo ivez, prest eo S.A.E. da zegemer ur rumm kudennoù stignet gant ar varksouriezh hogen, war un dro, ne asant ket da reiñ dezho an diskoulm kinniget gant houmañ. Hogen daoust ha se a c'heller ober hep distrujañ kempoell diabarzh ar gelennadurezh varksat hag hep skarzhañ diouti hec'h awen, koulz lavaret ?N'eus ket ezhomm bezañ lennet penn-da-benn skridoù Marks evit merzout e ra hemañ eus an armerzh keflusker an Istor. Arabat eo disofijal evelkent ez embann ar varksouriezh bezañ un danvezelouriezh goude ma vefe doareet homañ evel un "danvezelouriezh istorek". Ar roll istorel a zo debarzhet da renkad ar vicherourion n'eo ket tidel na trivliadel ; ar "genderc'herion" wirion eo ar vicherourion er bed ijinerezhel krouet gant ar gevalouriezh ha dre se emañ ganto ivez ar galloud (nemet ne emouezent ket, betek henn,ouzh ar galloud-se). Er meizframm marksat eta n'eus lec'h ebet d'ar vroad evel broad na d'ar Stad evel stad ; adal maz eo etrevroadel ar c'hevala hag ar c'henderc'hañ ne c'hell ar stourm bezañ renet nemet er par etrevroadel pe hollvedel. Ned eo ar vroad, a-hend-all, nemet un aspadenn eus ar marevezh gladdalc'hel pe un usframm a zo e roll kafunañ galloud gwirion ar c'hevala etrevroadel.

Paotred E.S.B. hag an "Taupe Bretonne" hepken o deus klasket termeniñ ur reizhpoell bennak e par an damkanañ etre ar varksouriezh diouzh ar c'hiz hiziv hag ar vroadelouriezh. Hogen, war a seblant, ez eo furmel, kalvezadel ha diwirion ar reizhpoell-se pe neuze ne zisoc'h nemet da zistrujañ ar vroadelouriezh evit erlec'hiañ outi ur gelennadurezh prederouriezhel kravezel led-varksat, hollvedel, sañset, hogen, e gwirionez, hep maezienn oberiañ resis ebet daoust d'ar yezh hec'h unan (fellout a ra deomp lavarout ez arc'hwel ar strolladoù komunour en ur framm istorel bennak, pezh na ra ket zoken E.S.B., lakaomp peogwir ne gaver mui e-barzh

kelennadurezh houmañ dave ebet da Vreizh ha d'an Emsav istorel : E.S.B. a zo un deroù groñs, un deroù dizave.

Ret eo gwelout eta er youl a ziskouez paotred S.A.E. da chom stag ouzh stourmoù ar werin ar preder da zont er-maez eus ar geto emsavel ha da zont e darempred gant gennadoù zo eus ar boblañs a zo awenet en he fleustrerezh politikel gant ar varksouriezh. Ar preder-se a zleer meuliñ, moarvat, daoust ma ranker gwiriañ n'eo ket gounezet an darn-vuiañ eus ar boblañs e Breizh da dezennoù ar varksouriezh.

An dañjer a zo stag ouzh ar politikerezh-mañ hon eus diskuliet meur a wech ; c'hoarvezout a ra eus an dic'halloud da reiñ ur stummadur prederouriezhel sirius da izili S.A.E. a chom enket war dachenn ar yezhelouriezh, - ur yezhelouriezh diziazez a-walc'h o vezañ ma n'eo mui ar brezhoneg yezh ar werin e Breizh-Izel zoken (ne vez implijet ingal nemet gant 65% eus ar boblañs war ar maez, e-touez ar gwiskadoù koshañ). An heuliad eus kement-se e vo moarvat divarregezh an aozadur - ma ra berzh - da herzel ouzh ur galloud marksat diazezet e Paris en em harpfe war ar Stad c'hall (a c'hellfe, dicuzh ret, ober van da astenn un nebeut aotreadennoù war dachenn ar yezh evit sioulaat an nagennerion). Ne gredan ket avat ez eo dañjerus evit S.A.E., er c'hontrol, ar stolloù kleizelour breizhat ha na bledont ket a-zevri gant ar yezh, a-hend-all.

Ar preder da chom a-stok ouzh ar werin ivez en deus degaset izili zo da reiñ d'ar rannyezhoù ur pouez ha n'o deus ket en arveradur ar yezh; er preder-se e ranker merzout, e gwirionez, levezon stolloù zo - evel AL LEUR NEVEZ - ez eo bet S.A.E. e darempred ganto. A-hend-all e komprenan mat va unan an doare trivliadelezh a stag "Breizhizeliz" ouzh brezhoneg o c'horn-bro. Me va unan a sine va lizhiri "Oliar" - hervez giz prezeg Gwaien - p'edon o paouez addeskiñ ar yezh ha savet em boa devotamant ur roll eus gerioù eus Gwaien am boa dastumet diwar genoù va zad ha va mamm. Ar roll-se (meur a hini eus va c'hamaladed a neuze a save labourioù seurt se) n'em eus embannet biskoazh rak ne gave ket din e tegasje kalz tra d'ar yezh na din va unan o vezañ ma chomen troc'het diouzh ar metou henvoazel a oa bet hini va zad en e vugaleerezh hag e yaouankiz (ar roll-gerioù-se a denne d'ar vicher vartolod ha bez e kaved ennañ, dreist-holl anvioù pesked... a oa dianav a-grenn din a-hend-all). E gwir onez n'em beze tro da gomz brezhoneg nemet en Emsav C'hoarvezout a rae gant va mamm pe va zad dere'hel un tamm diviz ganin e brezhoneg - ha gouest e oan da gompren o zeodyezh petra bennak ma n'em eus klasket biskoazh komz evelto - hogen kement-se ne oa ket natur din o vezañ ma oan bet savet e galleg gant va zad ; setu, 'artifikel' e seblante din

"prechi" e brezhoneg gant va zud tra ma kaven natur tre er c'hontrol komz "emsaveg" - na petra! - gant va c'hen-emsaverion. Diouzh un tu all, se am eus merket, meur a wech, kaozeal a rae va moereb brezhoneg gant va zud a-hed ar wech daoust ma oa enebet krenn ouzh ar yezh a-hend-all (nemet desavet e oa bet e brezhoneg, setu!)

Bezef pe vezef, ne gav ket din ez eo disheñvel bras saviad an 'emsaverion' a ra war-dro S.A.E. hiziv, ha - nemet e teufent da vezañ kouerion en-dro hag int o chom en un taolead e-lec'h ez eo manet bev buhezek ar yezh e-touez yaouankizoù o rummad-int ne servijo ar brezhoneg dezho da vat nemet el labour politikel a gasint da benn evit an Emsav.

War hor meno bepred, ivez, ez eo touellus an darempred a zo skoulmet gant ar "bobl" e ser implij ur rannyezh bennak e-touez brezhonegerion a-vihanik ma ne dizher ket war un dro reiñ da gompren d'ar re-se peseurt ster "emsavel" a roomp d'ar yezh (rak, a-benn ar fin, e tesker muioc'h eus ar wir yezh poblek o lenn levrioù skrivagnerion zo eus an naontekvet kantved pe zeroù ar c'hantved-mañ ; hag evit ar pouez-mouezh, arabat en em douellañ kennebeut : dilezet e vez buan ar pouezmouezh ur wech ma teuer da chom adarre en ur metou galleger eus kêr ; se a ouzon dre skiant-prenet). Ma ne glask ket ar re yaouank a ya da bleustriñ war ar yezh 'vev' reiñ ur ster emsavel d'ar pezh a reont e vint kemeret evit oristaled a zo pitilh gant ur stultenn bennak, ha dre se e kollo o c'hammed pep ster emsavel ha politikel. Arabat eo disoñjal o deus bet ar vrezhonegerion a-vihanik - dreist-holl ar re na ouient ket kalz galleg, kas ouzh o rannyezh dre ma oa ar rannyezh-se - evel rannyezh dres - un doare karc'har o serre e geto ur barrez bennak hag o disranne diouzh ar bed arnevez. Gouest e oa moarvat bourc'hizion ar c'hentañ emsav da erbediñ d'ar "bobl" implij ar "brezhoneg" (e devoud, hini o zrefoedaj lec'hel); int o unan a oa e darempred gant an hollved dre ar galleg o devoa peurzasket er skol. Netra souezhus eta ma responte rannvroelourion a seurt gant ar yezhadurourion wenedek Gilevig hag ar Go d'ar re a argue ne c'helle ket ar "Vretoned" en em gompren etrezo dre ur brezhoneg rannet e nouspet eilyezh: "Petra ' vern peogwir e c'hellont en em intent p' o devez ezhomm dre ar galleg a zo o yezh dezho.-int?!" An "araogelour" Emil Masson, a-hend-all, a rae an hevelep respont : roll ar galleg e oa lakaat ar Vretoned e darempred gant an hollved ; graet e oa ar brezhoneg evit aotren d'ar "bobl" chom "pobl" ! Hogen daoust hag ar "bobl" he deus c'hoant chom "pobl" e gwirionez ? (1)

Ret mat ei gwiriañ a-hend-all e lam ar rannyezh - diouzh ma serr an dud e geto ur c'horn-bro - he ster digant ar yezh ; rak ster pep yezh eo lakaat a n hinienn e darempred

(1) Seurt renkadelouriezh trivliadel a zo diot.

gant an hollved dre hanterouriezh ur gumuniezh politikel he deus graet eus houmañ he benveg kefredel piaoel.

An iskisañ zo eo ve vez roet d'ar rannyezh er maremañ ur pouez dreistgoñvor (1) a laka unan da gouezhañ, a-benn ar fin, en un doare "gouennelouriezh kanton" pe da grouiñ ur meni brientinelezh nevez eus an "Du-mañ ' vez lavaret..." En un degouezh seurt-mañ e teu ar rannyezh da vezañ un doare tabcu ez eo arabat lakaat e kont nepred. O vezañ m'eo klevet ne c'hall ar brezhoneg dreistvevañ nemet e "Breizh-Izel" ha war ar maez ne c'heller ket magañ an disterañ douetañs diwar-benn an dazont skedus a zo miret d'ar rannyezhoù : er-maez eus ar rannyezhoù n'eus silvidigezh ebet evit ar yezh, setu ar bennaenn - gozh - a zo bet amprestet a nevez digant bourc'hizion ar c'hentañ emsav, hep gouzout d'ar re en em harp warni hiziv.

Evit klozañ, ne gredomp ket ez eo didalvez krenn mont da vevañ gant ar gouerion war ar maez ; un tu mat tre e c'hell bezañ evit diskouez d'an dud e Breizh-Izel petra eo an Emsav. Hogen koll amzer a reer ma venner e gwirionez deskiñ ur rannyezh bennak ; kement-se a vefe reiñ re a bouez d'un ober a eilrenk ha n'en deus ster politikel ebet hag a zo mat evit razhed levraoueg gouest da zeskiñ n'eus forzh petra ha na servijo dezho nepred. Pezh a zoujomp eo ^{na} ve distroet ar stourmerion diwar embregadennoù sirius tra ma kollint o amzer en ur c'hoariadenn ha n'he deus pal politikel ebet. Pezh a zo arvarus ivez eo e verzf e ar stourmerion buan a-walc'h e kollont o amzer o klask derc'hel ur roll diwallerion viridi hag e kuitafent an Emsav evit mont davet strolladoù pe stourmoù politikel estren ouzh Breizh hogen a seblanto dezho bezañ siriusoc'h eget an 'Emsav'.

=====

(1) Studiañ ur rannyezh n'en deus talvoudegezh ebet drezañ e unan, nemet e vefe graet en un doare skiantel rik pe gant ur mennad istorel evit mirout un testi eus tremened hor bro. N'eus forzh penaos e vez ar rannyezhekaat bepred un heuliad eus an arallekadur politikel.
